



Niv. 22  
Goānv 1941

## TAOLENN

D'al lennerien, gant H. ar Sperneier . . . . .	3
Ar soudard dianav, gant D. Mablern . . . . .	5
Ar rouelerien hag ar brezoneg, gant Yann Vriant	9
Pajenn ar yez : Geriou brezoneg beo nebeut ana- vezet gant ar skrivagnerien, gant Yeun ar Go	27
Ar Gador-dabutal . . . . .	30
Divinadellou koz . . . . .	35
An anioù a ra Bretoned 'zo eus o gwiragez, gant Perig an Noz . . . . .	36
Diwarbenn « Eur brezegenn vrezonek gant Na- poleon III », gant Y. ar Go . . . . .	38
Eñvorennoù a Durkia, gant Remont Jestin . .	39
D'unan dianket war an hent-bras, gant P.-M. Mével . . . . .	46
Distro, gant P.-M. Mével . . . . .	47
Sarmon evit gouel an Holl-Zent an deiz kenta a viz Du . . . . .	49
Kredennou ha brizkredennou e Breiz-Izel, gant Erwanig . . . . .	58
Fentigellou, gant E. Kenven . . . . .	70
Keleier . . . . .	72

### **D'AL LENNERIEN**

Skouarn vouzar o deus graet bepred gouarnamantou Bro-C'hall ouz goulennou doujus ar Vrezoned o klask lakaat ar brezoneg da gemer er skol al lec'h a zere outañ e Breiz. Trouzal a rae bepred en hon diskouarn komzou fraez ha dichek unan eus ministred an deskadurez e Bro-C'hall : « *Evit unvanidigez yez Bro-C'hall, ar brezoneg a dle mont da get* » (1).

Ar c'hoant laza ar brezoneg, displeget sklaer ha didro evit eur wech, a zo bet hag a zo bepred o ren doare-ober ar C'hallaoued e Breiz war dachenn ar yez ; morse n'eo bet dislavaret ar c'homzou-se ; sevenet int bet avat, e oberou, e lezennou hag e kemennou pep gouarnamant.

Ne gredomp ket, daoust m'eo kemmet gouarnamant Bro-C'hall, e vije kemmet ivez e zoare-soñjal diwar-benn ar brezoneg ; n'en deus ket hen diskouezet betek hen. An hevelep lezenn a seblant kenderc'hel da ren bremañ evel a-raok : *laza ar brezoneg dre zivrezonekaat muioc'h mui ar re yaouank*.

Bez' e chom koulskoude rummadou a Vrezoned vat, o kenderc'hel da gaout eun tammig fiziañs ma vo graet eun dra-bennak evit ar brezoneg gant ar gouarnamant nevez, war-bouez goulenn gantañ de-reat ha displega brao an traou d'ezañ.

(1) Komzou de Monzie (Anatole), kannad eus an Tarn ha ministr an deskadurez, e 1925.

Ne fell ket d'eomp o digalonekaat ; ra gendalc'hint eta da bedi, da aspedi ha zoken da heskinitud Vichy ha d'o chigarda ez hegarat gant o goulennoù hag o displegadennou. Laouen e welfemp hor c'henvroiz o tont a-benn da veza klevet ha selaouet gant paotred pounner-gleo ar gouarnamant.

Hogen n'eo ket gwall vras ar fiziañs a vagomp ; ar skiant-prenet diwar hor c'hont a ziskouez d'eomp e c'heller klask hon touella gant komzou kaer ha promesaou tra ma raer goap eus hor c'henvroiz vat, hag hegreidik... Evel Sant Tomaz ne gredimp ket ken na welimp.

Ma, gortoz a reomp ken na vo graet o esa gant ar Vrezoned a gred er gouarnamant ; ar gortoz avat ne vo ket didermen ; eun dibenn a vo d'an daleou.

Ha ma teu da veza anat emañ bepred ar gouarnamant o klask laza ar brezoneg hag ober goap war ar Vretoned o deus fiziañs ennañ, ar wir Vrezoned a gavo gwelloc'h enori o zadou hag o mammou, ha selaou mouez ar Vrezoned koz, kentoc'h eget douja muntrerien ar brezoneg hag heulia o mevelien. Hag ar Vrezoned vat a gompreno, ma ne vez ket selaouet ouz o goulennou dre gaer, e vo ret klask eun hent all d'o seveni.

#### H. AR SPERNEIER.

*Skrivet e oa ar pennad-mañ p'eo deut betek ennomp ar c'helou e vefe aotreet kelenn ar brezoneg er skoliou eun hanter eurvez bep sizun ; en diavez d'an eurveziou-skol avat... N'hon eus netra da gemma er pezh a zo skrivet uheloc'h.*

## AR SOUDARD DIANAV

Pa 'n gavas ar paour-kaez-mañ d'an abardaez-noz war ar c'hrevaz, hanter-vadaouet hag eur gouli doun en e zargreiz, en aner e voe furchet ganimp e c'hodilli hag e sac'h. Paper ebet ! Kollet e levrig-soudard, nijet kuit e liziri ma'n doa bet ! Kollet e vedalenn gant e zorn !

Boas e oamp ouz ar seurt kudenn ; ha ni'ta d'e c'houlennata. E ano ? E rujumant ? Chomlec'h e dud ? Respont ebet ! Skleurenn ebet en e zaoulagad damserret. Blenier ar c'harr ne ouie tra : e zastum en doa graet war gostez an hent goude ma voe tarzet ar vombezenn villiget dres war ar c'hleun.

« Marteze ne oar ket a c'hallec'h ; n'eo ket eur Sidi koulskoude. » Hag ar c'horporal, eun Elsasiad anezañ, da zistaga en Alamaneg : « Nun, Hans, wie schmeckt's ? Wie heisst du ? » Respont ebet ; aon a weled en e zaoulagad ruziet gant krizder e boan hag anken doun e spered en dic'hoanag. Kaset e voe d'e wele, hep dale mui.

Boas e oamp evel m'am eus lavaret ; hor micher e oa, trist evel pep micher-soudard en amzer a vrezel. Ha koulskoude, evel pep micher, evit ober anezi ervat ret e oa bet d'imp pell'zo reutaat hor c'halonou, evel hor medisined hag hor c'hlañvdiourezed o-unan ha n'o dije ket pledet mat ouz ar c'hloazidi m'o dije lezet o spered da brederia war druezusted stad pep hini, m'o dije lezet o daouarn da grenna gant an druez evit an nesa. Boas e oamp ; n'oa ket an hini kenta da veza degemeret en hon

hospital hep na vije kavet tu d'e zougen war al levriou, hep na vije en hor galloud gervel ar wreg pe ar vamm da frealzi ar paouez-kaez war e dremenvan.

Tri deiz a oa 'baoe oa bet kaset d'an douar eun den yaouank, gwisket e dilhad-glas ar vicherourien, hep na levrig na medalenn-arme, netra en e c'ho-dellou kennebeut, mes war e vrec'h-kleiz eul lien-vrec'h gant kement-mañ : « Travailleur Annamite 015723 ! »

C'hoaz eur wech, boas e oamp eta. Ha koulskoude en eur soñjal en den-mañ e oan gwasket gant eur seurt anken, daoust ma 'm bije bet mez oc'h ansav. N'hellen ket gouzañv soñjal e c'hellfe hemañ ivez, reuzeudig ha moarvat eun troad d'ezañ e baradoz ar gadourien, mont a-biou dianav hag hep gouzout dare d'e dud, evel al « Labourer Annamat 015723 ». N'hellen ket gouzañv e vije ret d'eun den mervel evel eur c'hi, hep mignon en e gichen d'e frealzi, en abeg ma ne gomze ket yez paotred ar bureviou.

En eur vont da gousket e oa bepred va spered gant an hevelep kudenn. Piou a zo da rebech ? N'eo ket ar Sidi, nag an Annamad, nag hemañ degouezet fenoz war ar c'hraevaz. Piou neuze nemet ni, paotred ar bureviou, jubennourien a hep yez e servij ar re war-nes mervel. Ha va spered a gantree tiz ha tomm ; difenn ar brezel, beza madelezes, adaoza reolennou an arme ; arme, yezou, brezel, yezou, relijion, yezou... Edon morgousket pa darzas em spered eur soñj a zlee beza bet eno pell'zo, hep gouzout dare d'in : « Ha ma vije eur Brezon ? Ha ma vije... »

Skuiz-divi, e sankis en eur c'houk doun, en eun huñvre teñval... Pa zihunis a daol-trumm, yen va dremm gant ar c'houezadur : ar soudard dianav a oa o klemm, rangalonus, o klemm e brezoneg : « Mamm, lo ! Mamm, lo ! Mervel a rankan... » N'oa

nemet eun huñvre ; n'oa nemet div eur. Goap a vo graet ouzin, gourdrouzet e vin ! Hogen kaer am boa en em c'hourdrouz hag arnodi soñjal e traou all, kreñvoc'h e oa an huñvre. Lakaat a ris va mantell ha dre an hospital davet ar glañvdiourez war c'hednoz.

Hep lavarout perak, e ris d'ezi dont ganin betek gwele ar soudard dianav. Taget e oa gant an derzienn, alonet herr ha raouliet. Aesaat a reas d'ezañ kalz pe nebeut gant dorn ar c'hlañvdiourez war e dal. Ha me d'ezañ : « Selaou, va mignon, penaos en em santez bremañ ? » Ne voen ket souezet o welout e zaoulagad o tigeri ; em dorn e krogas war al liñsel wenn, e zorn a grene gant an derzienn ; sederaat soudan a reas e sellou. E vuzellou a dorchan an eon outo a zigoras gant eur mousc'hoarz trist : « O, Yfig, deut out, la ! Ha mamm pelec'h emañ ? » — « Dont a ray, emoun-me ; warc'hoaz e teuy ! » Va c'hemer a rae evit e vreur moarvat. Ha me goustadik, dre ma koueze e derzienn, da ziskleria d'ezañ pelec'h e oa, ha petra a oa c'hoarvezet gantañ. Dont a reas d'ezañ an anaoudegez ; skriva a ris e ano. Per ar Gosker, eus al Laz ; n'oa ket bet er skol ; n'en doa ket bet graet e gonje en arme, re yaouank ; galvet d'ar brezel daou viz a oa. « O, emezañ, 'dalv ket 'r boan, ne welin ket mamm ; fin'zo d'in. D'eur beleg e karfen kovez araok... »

Ar beleg en hospital a oa eur c'hreisteizad. Ar glañvdiourez a yeas d'e gaout. Fallo'h fall, gwanoc'h gwan e poulze ar gwad en e wazied. Koulskoude e oa ankeniet meurbet gant eun dra bennak war e goustiañs, a vije ret d'ezañ dizamma evit tremen e peoc'h. Ha me d'ezañ : « Beleg oun, va mignon ! »... Pa 'n em gavas ar beleg, e oa semplet adarre ar paour-kaez hep anaoudegez, dindan yeo an ambren ; ne c'hellas nemet rei d'ezañ an absolvenn.

Mervel a reas Per ar Gosker araok goulou-deiz goude kimiadi diganin evel ma vijen bet e vreur Yeun. Salvat e voe e ene moarvat dre absolvenn ar beleg. Hogen e sell ouz e evurusted er bed-mañ, me eo a zizammas anezañ eus e bec'hedou. Brasa gaou am eus bet graet, a dra sur. Morse koulskoude n'am eus hen ansavet abaoe er govesion ; perak ? N'oun ket sur tamm ebet am boa ar gwir d'ober evel ma ris en noz-se. Ne gredan ket koulskoude e vije bet diskleriet d'in en huñvre piou a oa ar soudard dianav, ma ne vije evit e frealzi evel ma ris en noz-se.

Ra vezin pardonet, ma 'm eus faziet, gant Doue madelezes ha gant Per ar Gosker, eus al Laz, Brezon brezoneger marvet evit ar C'hallegerien.

D. MABLERN,  
*Miz Du 1941.*

## Ar Rouelerien hag ar Brezoneg

Ar re a zo bet en em ouestlet da gas o menozioù politikel da benn o deus klasket, a holl-viskoaz, lakaat ar bobl a-du ganto. Kement-se hon eus gwelet n'eus ket pell c'hoaz. Lies-doare, avad, a oa d'ober eur seurt labour.

Epad ar gantved diweza e oa dibaot ar c'hazetennoù. Daoust ma 'z eus, en amzer a vevomp, kalz tud dizek hag hanter-azened, e c'heller lavarout ez eo desketoc'h, dre vras da vihana, hor c'henvroiz a-vremañ eget ar re o deus bevet adalek an Dispac'h betek ar bloaz 1900. Ne gomzan ket amañ, a dra-sur diwarbenn o gouiziegezh war ar brezoneg, o yez pem-deziek, rak, siouaz !, evito da veza paket eun tam-mig deskadurezh e skol o farrez, kalz o defe da zeski araok beza koulz hag o zud koz da gomz yez o bro.

Araok ar brezel-mañ e oa deuet ar c'hazetennoù da veza kannaded ar *gostezenn wenn* koulz hag an *hini ruz* hag ar c'hostezennou-all, ken niverus m'o devoa ranket dibab liouioù-all evit beza anavezet an eil diouz eben. Lennet e vezent e Breiz, er c'hêrioù ha war ar maez, gant an holl koulz lavarout, n'eo ket hepken en abeg ma kaved enno keleier ha nevezentioù eus ar vro hag eus ar bed-holl, met o veza ma tisplegent ivez mennadoù o renerien diwarbenn ar politikerezh. Deuet eo bet c'hoaz ar skingomzerezh, ijinet abaoe ken nebut-all a amzer, da skoazella ar c'hazetennoù en o labour. Ha kement-se en eun doare galloudeus-kenañ.

Evel-se e veze sanket, dounoc'h-douna bemdez, e spered ar bobl, bep seurt kredennou ha menoziou ha n'he devoa kent anaoudegez ebet anezo.

Da vare ar maliou-post e c'heller kredi ne oa ket heñvel-tre doare an traou. Diaes a oa beaji ha nebeut a-walc'h a gazetennou a veze lennet gant an dud. Evit tizout ar bobl e kavas darn, koulskoude, eun doare plijus ha leun a ijin war eun dro. Soñj a zeuas d'ezo da sevel soniou, gwerzioù ha kanaouennou evit strewi o menozioù dre ar vro. Setu ar pezh a reas ar rouelerien, pe baotred ar roue, e Breiz.

Dastumet em eus eun nebeut eus ar c'hanaouennou hag ar gwerzioù a voe savet ha skignet ganto e-touez hor c'henvroiz e-doug ar gantved tremenet. Fiziañs am eus e vo diduet lennerien SAV gant ar skridoù koz-se. Talvezout a ray ar re-mañ, da vihana, da rei eun tañva d'ar Vretoned eus brezoneg ar rouelerien goz.

Yann VRIANT.

## CHANSON VAR AVANTACHOU BRAS AN DRAPO TRICOLOR

(Var don : *Adieu Pontreo*)

1

M'ho salud, banniel an tri liou,  
Banniel meurbet respectabl ;  
Te a ra hon holl deliçou,  
Te a zo deomp profitabl.  
Te a heuz deomp-ni digasset  
Eun eürustet ar vrassa.  
Var an tourioù oc'h da velet  
E tridomp gant ar joa.

2

Pebeuz avantach, en effet,  
Evidoc'h va c'henvroiz :  
Hebd'han e zoac'h holl esclavet,  
Ganthan e zoc'h holl rouiz.  
Grit a gerot, n'euz den ebet  
A gement ho koundaounfe,  
Banniel an tri liou beniguet  
A ro deoc'h peh liberte.

3

Grit trous ha grit cals cholori,  
Noz ha deiz mar kirit,  
Troublit e renoz d'an hini  
En deuz ar brassa merit.  
N'en deuz mui a autorite  
Hag a gredfe e zifen,  
Rac oc'h unan e zoc'h roue.  
Penaus ober deoc'h lezen ?

4

Rac-se, dre c'hraç an tricolor,  
E c'hellot holl, ep cuzet,  
Foueltra ar prenestr hag an or  
Heb beza gant den blamet  
Hag ober cals charivari  
D'ar person, d'he gureet,  
Pa ne fell dezo interri  
An dud escommunuguet.

5

Oh ! caera avantach, eta,  
Roet deoc'h gant an tri liou.  
C'houi a ello forci brema  
Ober interranchou.

C'houi oc'h euz liberte d'ho kiz  
Ha pa gerot lavaret,  
En despet da Zoue, d'he Ilis,  
A dra zur e viot salvet.

6

En he raok oc'h euz bet paet  
Cals taillou, cals sucidou,  
Mes hiviziken ne reot ket  
Dre c'hraç banniel an tri liou.  
Guechall e roac'h eur miliard  
Mes breman, o burzudou,  
Ne baeot ket memes eul liard.  
N'ho pezo mui a daillou.

7

Da viana int scanveat  
Rac, elec'h eur miliard,  
Ne bait breman, clevit mad,  
Nemet quitip eul liard  
Eun anter miliard ouspenn  
Vit ho mad, hoc'h assuranc.  
Sellit piz, eta, en daolen,  
Hoguen pebeuz differanc.

8

Araok ar banniel a dri liou,  
An dud iaouank a renke  
Monet ive d'an armeou  
Ha da servich ar roue.  
Mes pebeuz avantach dezho !  
Rac, elec'h daou c'hant mil den,  
An tri liou a c'houlénno  
Pemp cant mil a dra certain.

— 12 —

9

Kent eguet ar banniel tri liou,  
Hon tyes a oa secret.  
Serri a ellet an oriou,  
Pa garet ho digoret.  
Mes, dre vertu an tricolor,  
Hirio, pebeuz differanc,  
N'hel mui beza na ty na dor  
Hag ha vez en assuranc.

10

Partout, en hano an tri liou,  
An nobl evel ar partabl  
A ranko diskouez e scridou,  
Daoust ne deo ket convenabl,  
Ha livra e vrasa secret  
D'ar c'henta her goulénno,  
Pa vent memes poliçonnet.  
Kement-se ne ra meno.

11

Eun avantach c'hoaz bras meurbet  
Roet deoc'h gant an tri liou  
Eo da veza hon delivret  
Dioc'h ar processionou,  
Pere a oa ken dangerus  
Pa dapet enno klenved.  
Mes breman holl oump iec'hedus  
Abaoue m'int difennet.

12

Test a guement-se er vro man,  
Ouspenn seiz cant den maro  
Ha teir guech muyoc'h a dud klanv  
Gant ho zourmanchou garo.

— 13 —

Evelse int bet preservet  
Dioc'h klenvet, dioc'h ankeniou,  
Abaoue m'az eo difennet  
Ober processionou.

13

Guechall ar groaz var an hentchou  
A rea d'an dremenidi  
Lemel dirazhi ho zokou  
Evit dont d'he zaludi.  
Mes abaoe banniel tri liou  
Ne dint ket kement genet,  
Obliget en deuz ar c'hroasiou  
Da dec'het, d'en em guzet.

14

Doue memes, en he demplou,  
Ne ma ket en assurans,  
Nemet dre c'hraç an tri liou,  
Er rouantelez a Franç.  
Oh ! vertu euz an tricolor,  
Te zo meurbet preciuz  
En env, en douar ha var vor.  
Guenez ni vezo eürus.

15

Mes, euz an holl avantachou,  
Ar guella hag ar c'haera  
A zo deut deomp gant an tri liou,  
Ententit mad kement ma,  
Eo da veza, dre he voyen,  
Mouguet ennomp ar respet  
Hor boa guechall vit beleien,  
Memes evit seurezet.

16

Guechall e oamp sot aoualc'h  
Evit, hervez hor e'hreden,  
Songeal e oa hon avantach  
Ho rei dezho aluzen  
'Evit deza distribuet  
Dreizo d'ar re valeürus.  
Mes ni a voa diskiantet,  
Kement se a ioa abus.

17

Abaoue m'hon deuz dilezet  
Seurezet ha beleien,  
Ar paour zo guelloc'h sicouret.  
N'euz kasi mui a beorien,  
Rac ar bureo particulier  
A raio, heb douetans,  
Dre gommiseret ar c'hartier  
Ma do an holl abondanç.

18

Breman ne vezo mui peorien,  
Ne vezo mui a guestou,  
Rac great e zeus eun difen  
A berz banniel an tri liou.  
Holl e renkomp beza pelloc'h  
Pinvidik, mondianet,  
An dra ze a zo cals guelloc'h.  
Kement se a zo anet.

19

Hag, en effet, guir Vretonet,  
Her guelet a rit breman  
Pegement oc'h pinvidiket  
Abaoue moc'h euz anezhan.

Ho commerç a ia da netra,  
Ho taillou a zo doublet,  
Kement se a brouv ar guella  
E zoc'h holl mondianet.

20

Araok an tri liou, gant roue,  
C'houi a ioa holl diouallet.  
Mes breman, ha piou her c'hredfe,  
Chetu c'houi holl soudardet.  
Roue oc'h evit commandi,  
Pebeuz avantach deoc'h-hu,  
Ha soudardet evit senti.  
Var-se petra songit-hu ?

21

Peb unan, dre he natural,  
E Franc a so obliget  
D'antren er c'hard national  
Pe beza teir guech piquet  
Ha coll goude he holl viriou  
Euz a citoyen-roue.  
Admirit, eta, an tri liou,  
Avantach al liberte.

22

En despet deoc'h, breur citoyan,  
C'houi ranko c'hoari soudard  
Ha, pa n'ho pe bet tam d'ho koan,  
Sevel a rankot ar gard.  
List da grial greg, bugale,  
Mes torrit ho naoun dezho  
En hano euz al liberte  
Roet deoc'h gant an tri lio.

— 16 —

23

Araok amzer an tri liou  
He ranke an holl labourat  
Hag breman zeus eur bloaz pe zaou  
An ed a ioa gual varc'had.  
Breman n'hon deuz tra da ober,  
Hon divrec'h a zo croaset,  
Mes gant liberte, oh ! bonher,  
Hor c'hovou a vo carguet.

24

Salud, eta, banniel tri liou,  
Banniel meurbet dudiuz,  
Ganez ni raio hor c'hoariou,  
Ni a vezo holl eüruz.  
Hag evit se ni a grio  
E kement lec'h ma vezi :  
« Cant mil guech eüruz eo ar vro  
A ell did-te dimezi ! »

## AR ZON C'HALV (1840)

Ton : *Saizi Guengamp.*

Clevit, clevit, guir Vretoned,  
Gant eur prinç iaouank omp galvet  
D'he zicour da ziframm' ar vro  
Dioc'h erabanou mistri garo.

Dek vloa zo emaint o zunal  
An dour a ziver diouz hon tal.  
Petra jom mui gaenomp a vad  
Nemet hon diouvrec'h hag hor goad ?

— 17 —

Mar n'ho bet coll nemet argant  
Gant hon enor ni ve contant ;  
Mes me vel ar bed o c'hoarzin  
D'hor broïc paour var he daoulin.

Tavit, tavit, guir Francizien,  
Re bell oc'h euz stouet ho penn,  
Erru Herry ! n'euz ket he bar  
Evit lakat fin d'ho klac'har.

Broncen glaz dour a vouen Bourbon,  
Goad Sant Louis verv en he galon ;  
Mab bian da Herry pevar  
A zo, a glevomp, dezhan par.

M'her guel o tont var an dachen,  
Ar blumachen ven var he benn :  
« Sell, Breton, ouz va flumachen  
Ha deuz d'am heul er guir rouden.

Breton, me oar mad petra oud,  
Clevet am euz comz ac'hanoud :  
Ferm oud en da religion  
Ha royalist en da galon.

Ma na gredez ket em befe  
Memez feiz, memez carante  
A memes esperans ganez,  
Goul digant person da barrez.

Ma na fell ket d'ar Brovidance  
E ven biken roue e France,  
Duk e vezin e Breiz-Izel  
Ha da gabiten pe mervel ! »

— « O, prinç din da veza karet,

Er vro-ma, kent m'az oc'h digouet,  
Da vestr varnomp c'hui a jomo,  
Pe da Baris ni ho kasso.

Evit pelloc'h ne chomimp ket  
Dindan treid coz alvoadet,  
Tud a justis var ho meno,  
E guirione goalenn ar vro.

Serjanted ha maltouterien  
A gerz hirio huel ho fenn.  
Hucher, noter, potr ar guiriou  
A ruill ar voul pa ma gantho.

Evidoc'h-hu, micherourien,  
Couer, noblans ha beleien,  
Pa fell deoc'h, d'ar vaz grit ho chouk,  
Ha dougit ar yeo var ho koug.

Mar carze, d'ar mare zo bet,  
An eskibien beza comzet  
Ha noblans tennet he sabren,  
Ne ket kearis ve var hor penn.

Mes, siouaz deomp, lezet omp bet  
E scol cliq ar Jacobinet,  
Ken habil da liva geier  
Ha ma zint da scarza ilc'hier.

Evelse, gant mil ha mil gaou,  
Ho deuz sarret deomp hor genou  
Epad ma cassent meaz ar vro  
Guella roue zo bet pell zo.

Tad ar bobl eur vech forbanet,  
Var ar vro ractal int kouezet

Evel chass mud var eur c'haign fall,  
Darn da gignat, darn da schleigal.

Ma Doue, piou hon delivro ?  
Fuzul, kleze, tout maint gantho.  
N'euz forz, mont a reomp da gommans.  
Ma Doue, sellit ouz bro Frans !

Defaut fuzul, défaut sabren,  
Ni c'hoario gant hon torr he ben.  
Filc'hier, ferc'hier, hachou zo mad,  
Pa vent lemnet, da leuskel goad !

Ni oar tapout, en eun taol red,  
Canoliou ar citoyanet ;  
Ar re goz a oar ar vicher  
Hag ar vugale zo lijer.

Hola ! me glev son an tocsin,  
Tennou canon, trouz taboulin.  
Erru Herry ! var zao potred !  
Fuzuliou aoualc'h zo digouet !

## SON HERRI PEVAR, ROUE FRANCE

Na pebeuz Roue  
Eo bet Herri guechall !  
Coulz a hell bale,  
Mes nicun en tu all  
Ne vezo guelet  
E France nag e leac'h all !

Ar roue Herri  
A oa eur potr dioustu  
A garie hardi  
He Janned ha guin ru  
Hag, o combatti,  
A ouie cregi dru.

E creiz ar stourmad  
E comzaz evelhen :  
« Dalc'hit ho lagad  
Va va flumachen ven,  
Sur eo d'ho lakat  
Bepred er guir rouden. »

Herri a garie  
An dud divar ar mez  
Hag a reket  
M'ho dije, bep sulvez,  
Yar er pod d'ezhe  
Da zibri en ho ez.

Herri pevare  
Ne deo ket maro c'hoaz  
Rag e vugale,  
He lignez hag he raç  
Zo leun a vuhe :  
Graç deo da jom mil bloaz !

Mar distro biken  
An diaoul da c'hoari ' vaz,  
Gouestl omp da zouten  
Ar Roue en he blaç  
Ha prest ha laouen  
Da roi bep a daol baz !

## ANN DASPRENER

Ton : *Kelven pe Va c'haloun a zo fraillet.*

Beteg peur, o va Doue, e vo guelet Bro-C'hall  
Breset gant enebourien, pistiget gant tud fall !  
Peleac'h ema ar sturier helfe dre he furnes  
Miret outhi da skei ous kerreg didruez ?

Eunn den, eunn den a glaskomp ha ne gavomp netra  
Nemet bugale dister var ho zreid o krena,  
En ho dourn eur stoloker pa ve red eur c'hlese  
Gret gant dir, great gant houarn ha dremmed a-zoare.

Penaos, eta, e stourmimp ous ar ganfartet rus  
A zo e kear, er meziou o labourat founnus,  
O teurel kranch ha bilim ous kement a zo mad  
Hag o vernia ar c'heuneud 'vit ober eunn tantad.

Ann tantad-ze, mar gellont, eb dale a zevo  
Hon enor hag hon danves, hor feiz-kos hag hor bro,  
Ne chomo var an douar nag ilis nag aoter...  
Var ho tillad e nijo ludu kroas hor Zalver.

Ra zeui va zeod dirazoc'h da skourni em ginou  
Ha va breac'h-deou da zounna, ma prezegan ar gaou !  
Paris o tivogedi, eunn arc'hescop lazet,  
Re sklear, siouas, a ziskoes ne laran gaou ebet.

Ma vije da viana peur c'hreat ann abadenn  
Hag ebestel ann dizurs diskaret da viken !  
Neuze, goude kals daelou, e c'helchemp ehana,  
Mes goassoc'h eget biskoas ann drouk zo o struja.

Nann, n'eo ket mouget avoalc'h glaou Gomor ha  
[Sodom,  
Lakit ho tourn varnezho hag e santfoc'h int tomm,  
Pa c'hoezo ann diaoul emaint beo adarre...  
Krena re va izili : va Doue, va Doue !

Ar Republik a lavar e c'hello dont a benn  
Da zerc'hel bleizi, denved, e peoc'h var he barlen,  
D'ober breudeur anezho, d'ho c'has var al letoun  
Evit eno, fri ha fri, glazeri ho c'haloun.

Ann denved a zo denved, kigerien ar bleizi,  
N'eo ket furnes ho lakat mesk a mesk da beuri.  
Pa vo stag gant ar yeot ar paour keas pen danvad,  
Ar bleis a zaillo varnhan hag a evo he c'hoad.

Deuet eo bet ar Republik diou vech en hon toues  
Atao divar ar gounnar, fall-tu ha divades,  
Laeres, blasphemi Doue, laza ha c'hoas laza :  
Chetu e tri c'her histor ar Republik kossa.

Hag em be kant teod maoues, birvidik em ginou,  
Biken n'helfen diskleria pegement a grimou  
Zo bet great gant ar c'hrac'h-ze a vuntras roue Frans  
Hag a gassas d'ar chafod beleien ha noblans.

Ann eil Republik ive, henvel ous he mam gris,  
Lipous a zunas ar goad var mein ruiou Paris.  
Kement a fank a vressas ma chomas bars ar pri ;  
Ne danas ket va lagad oc'h ober kaon dizhi.

Ar Republik a zo hirio a zo mes he guelet,  
Eur barr toussigi arne var hor bro zo skoet ;  
C'houezet var ho c'hrabanou var gourre ann doren  
E kav dezho int goazet... Amprefanet n'int ken.

Ne ket gant pri ar poullou eo e vev ar re-ma,  
Na gant nebeud guenneien, tra, tra, tra, tra, tra, tra,  
Pa vezo bet eur rummad e teui eur rummad all  
Ha goaderezet neves evit suna Bro-C'hall.

Atao e vimp ruill, diruill er revolution  
Rak hor Republikanet zo eb relijion,  
Chenchet hor heus daouzec guech e pevar-ugent vloas  
Hag a fors da ziloja emoump hirio enn noas.

Ne deus nemet eur remed da drouc'ha hon tersien,  
Doue enn hor c'halonou hag eunn den enn hor penn,  
Eunn den ve ar guir ganthan 'vit miret da laret :  
Perak hennes enn huel ha me ne veffen ket ?

Epad pevarzec kant vloaz ar Frans zo bet eurus,  
Dreist peb bro anavezet hounnes a ioa nerzus ;  
Pa lavare eur gerik, an douar a dave  
Ha pa zave he baniel ar bobl oll a stoue.

Rag neuze ar Fransisien a ioa guir zoudardet  
A zifenne ann ilis hag ar guir dre ar bed,  
Neuze hor boa rouanes legitim ha kristen  
A ioa gloar hag enor stag ouz ho drapo guenn.

Ma vichac'h bet ganeom-ni sant Lois, Herri pevar  
Er brezel-ma trubuilhus hon ledas d'ann douar  
Ketao, Bismark a Guillou, araok mont a Vro-C'hall  
O pije lounket houarn, eleac'h guin ha kig sall.

Nann, ne ket ners na kaloun a vank d'ar Fransisien,  
Nann, nann, netra ne vank deomp, netra nemet eunn  
[den.  
Eunn den a lignes huel, enghan feiz iac'h ha kre  
Hag enn de d'hor c'hommandi ar guir a bers Doue.

Eus a c'hoad Herri pevar e chom eur beradik,  
Eus ar goad-ze ken nerzus, ken dous, ken pinvidik,  
Miret gant ar Brovidans, ma vi, Frans, adarre,  
Ar c'haerra rouanteles goude hini Doue.

Arabat eo argila, dre ma klevimp krial,  
Bezomp eur vech kalounek, arpomp ous ann dud fall :  
Herri pemp zo dirazoc'h, ganthan he vaniel guenn,  
Hennes eo hor guir roue... Plas dezhan, Fransisien.

## ANN DUD FALL D'AN TRAON !

Red vezo kass da Baris kanadourien nevez,  
Ha varc'hoas setu digor kelorn ar voterez.  
Disliv oun gant an derchen dirak ar voestik-se...  
Ar vuez a zo enni, ar maro zo ive.

Buez ! mar domp kalounek ha ma stlapom a-bell  
Ar Barveien divadez a ra deomp ar brezel ;  
Maro ! ma zomp krenerien ha ma verzomp hor bro  
Oc'h eva bilim aeret e-skeud ar bod ilio.

Bro-C'hall, na c'hui ioa skedus p'or' boa prinset  
[kristen,  
Cleze braz ouz ho c'hostez, kelc'hik aour var ho fenn ;  
Var ann enor, ar justis ho zron a ioa harpet  
Hag hano ar Fransisien pep lec'h a ioa brudet.

Petra oump hirio, siouas ! nemet tud a netra  
A deu da granchat varnho ar boblou distera ?  
Bro-C'hall elfet da henvel, eb beza tam gaouiat,  
Barados ar ganailles hag ifern ann dud vad !

— Livirit d'in, archerien, petra zo a nevez  
Ma teuit, an heol c'hoas kuzet, da gommans ho tervez,  
Ha deut e ve d'eoc'h kelou euz laeron, muntreien,  
Ma velan ganeoc'h bouc'hal ha cleze, ha sabren ?

— Ne deuz na laer, na muntre o koll d'eomp hor  
Ar re a zegas Paris oll a zo pardonet, [c'houket  
Mes beza zeuz Jesuistet ne reont nemet pedi...  
Ho dorozou a flastrimp gant penn hor bouc'hili.

Er meas Freret, Seurezet ha c'hui oll kristenien  
A zoug kroas pe japelet var zae ar binijen !  
Er meas ar groaz he hunan... hag e kuez ar croaziou,  
Euz ti-skol ar vugale ez eont a garradou !

Goude oberou ker brao e fellas d'ann dud-se  
Var doc'hora digaras kaout eur bodik laure.  
Ar zoudardet rank hale dindan eunn heol bero  
Hag e Tunis, eb beleg, mil ha mil a varvo.

E-penn labourou ker fall, evit mez Breiz-Izel,  
Hor beuz kals deputeet ne fell ket d'in henvel.  
Breudeur, bezit kalounec, arabat eo d'eoc'h mui  
Fiziout ann denvedigou en eur vanden bleizi.

## PAJENN AR YEZ

Geriou brezoneg beo nebeut anavezet  
gant ar skrivagnerien

KALVENNIG, KALVENNIGED, ano gwregel.  
Balafenn.

Sk : Eur galvennig velen a welan o nijal (Gwezeg).

KROGNA, verb.

Leuskel eur vuoc'h, eur c'havr, eur gazek... hep  
he goro a zo ober d'ezi krogna pe lakaat ne deve da  
greski gant al laez. Implijet e vez ar ger-se ivez evit  
lavarout en deus unan-bennak c'hoant bras da zizou-  
ra, met n'eo ket an dra-ze gwall-seven.

Sk : Laoskit ar vuoc'h zu da grogna, rak warc'hoaz  
e vo kaset d'ar foar.

Krogned e oan gant ar c'hoant-dizoura (Pleiben ha  
tro-war-dro).

DEVE, DEVEOU, ano gourel.

Tez, tevez eur vuoc'h.

Sk : Teziet-brao eo ar vuoc'h nevez, eun deve kaer  
he deus (Pleiben ha tro-war-dro).

DEVEI, verb.

Dont da gaout eun deve bras.

Sk : Prest eo ar vuoc'h da hala, emañ-hi o tevei  
(Pleiben ha tro-war-dro).

DOPES, ano gwan.

Neuziet gros ha pounner.

Sk : Dilhad dopes a oa gantañ war e gein.  
Gwall-zopes e kavan ar skudell-mañ (Pleiben ha tro-war-dro).

EBET (an taol-mouez a vez lakaet war ar silabeñn genta).

Talvezout a ra ar ger-se kement hag : *eun dra vat eo evitañ, emzav eo bremañ ganti, talvezout a ra d'ezañ kaout...*

Sk : Ebet eo d'ezañ kaout pansion a-berz e vab (Pleiben).

GOAINA, verb.

Dont da veza distuz ha gouez.

Sk : Dont a ray ar park-mañ da c'hoaina ma ne vez ket labouret gwelloc'h eget bremañ.

Hemañ n'eo nemet eun tamm douar goainet (Pleiben, Gwezeg, Sant-Toz).

CHAKAO, CHAKAOIOU, ano gourel.

Eun dalc'her pe eur marc'h-karr koad, tri droad d'ezañ.

Sk : Lakait ar chakao dindan ar c'harrad-melchon (Pleiben).

CHOURIG, ano gourel.

Kabell kougoulek.

Sk : Eur chourig a zo gantañ war e benn.

Eur boned chourik am eus prenet d'am merc'h vihan (Gwezeg).

SKALPA, verb.

Dibri en eur ober trouz (brita, floupa). Ne vez implijet ar ger-se nemet pa gomzer eus ar moc'h.

Sk : Dibri mat a ra ar wiz koz, skalpa a ra he boued.

Eur skalper eo va femoc'h bihan (Pleiben ha tro-war-dro).

SKLIÑSER, SKLIÑSEREZ.

Nep a vez ar skliñsetez gantañ (Pleiben ha tro-war-dro).

SKLIÑSETEZ, ano gwregel.

Tanoenn, foerell.

Sk : Ar skliñsetez en deus paket diwar eur c'ho-fad-kigenez (Pleiben ha tro-war-dro).

SPUFA, verb.

Spinac'ha.

Sk : Spufa a ra e vuzellou gant ar yenijenn (Pleiben).

STRUJ (eul liester evel *dero*).

An ano-se a vez roet d'ar pin-gouez pe bin-mor.

Sk : Pilet eo ar gwez-struj (Pleiben ha tro-war-dro).

TRIDEG, ano gourel.

Tredeog.

Sk : Bremaik e rankint plega pa zeuy an trideg war o zro (Lennon).

YEUN AR GO.

## AR GADOR-DABUTAL

*Dindan an ano-mañ e tigoromp, en hor c'he-laouenn, eul lec'h da vurutella evit ar re a gavo da lavarout diwarbenn ar skridou brezonek, labour ar c'hazetennou e Breiz ha kement tra hag a sell ouz hor yez. Kement-mañ a zo bet goulennet ouzimp gant meur a hini eus hol lennerien ha c'hoant hon eus bet da ober plijadur d'ezo.*

*Betek-hen ne oa kelaouenn ebet da rei bod d'ar pennadou burutellerez. Eun dra vat eo, d'hor meno, rei an tu d'hor c'henvroiz da lavarout ar pezh a soñjont a-zivout al labour a raer en hor bro war dachenn ar brezoneg. Talvoudus e c'hell beza eur seurt tra, koulz evit ar skrivagnerien hag evit al lennerien.*

*Ma vez feuket unan-bennak gant an abeg a vo kavet en e labour, arabat e vo d'ezañ kaout kasoni ouzimp. Ar gwir en do da respont d'e damaller.*

*Ne fell ket d'imp, e doare ebet, e teufe den da rital ouzimp, evit beza moulet, el lec'h-mañ, pennadou na blijfent ket d'ezañ penn da benn.*

SAV.

### I. — DIWARBENN RIMADELLOUIGOU-BUGALE PE BREZONEG FALL HOR SKRIVAGNERIEN VAT

Bep gwech ma tigouez d'in sellout ouz eur gazetenn pe eul levr brezonek bennak, e teu c'hoant d'in

da gredi ne vefe ket kavet, war an tamm douar-mañ, lorc'husoc'h ha fougeüsoc'h tud eget hor skrivagnerien. Gouzout a ouzont bralla o c'hloc'h o-unan pe hini o mignonned. N'eus ket par d'ezo war ar vicherse. Salo e vijent bet kerkoulz da skriva o yez ha ma 'z int d'en em veuli.

War o meno, n'eus nemet abaoe eun nebeut bloaveziou e vez skrivet brezoneg mat. Skrivagnerien gwechall (ne lavaran ket gwechall-goz) ne oant nemet tudigou diouizieq pe ezen gornek.

Ma ne oa ket holl ar re-mañ mailhed da sevel skridou a-bouez, e ranker anzav, koulskoude, e ouient ar brezoneg hag hini yac'h peurvuia. Daoust hag e c'heller lavarout kement-all eus « duerien-paper » hon amzer-ni ? Mantrus eo gwelout penaos e vez merzeriet hor paour kaez brezoneg gant eun darn vras anezo.

Ma n'am c'hredit ket, setu amañ eur skouerig am eus dibabet evidoc'h e-touez mil-all.

En eur pennad moulet war gazetenn *La Bretagne* an 19 a viz du 1941, ez eus bet ano eus rimadellouigou savet, gant e vamm hag e vreudeur, d'eur paotrig anvet Youen. Gant ar seurt regennou-se e vez heget ar re-yaouank ha graet goap anezo. Eun disme-gañs eo d'eur paotrig klevout ober fae warnañ evelse. Pa glev lavarout « traou » d'ezañ ha m'en deus eur beradig gwad dindan e ivinou, e krug ar paotr hag e vez taoliou-daouarn, flac'hadou ha krabiñsaded. Koz-bras e tle beza ar c'hiz d'ober goap, en doare-se, eus ar re-yaouank ha kavet e vez e kement korn a zo e Bro-Gerne ha, marteze, e lec'h-all.

A hend-all, tud souezus a-walc'h eo Lan hag Herve, skrivagnerien vrezonek *La Bretagne* pa reont va breur ha neket hor breur eus ar Youen-se a zo kaoz ganto diwar e benn en o fennad-skrid. Kement-se a ro lec'h da gredi e vefe kavet o fennou dindan an

hevelep tok hag o feskennou e-barz an hevelep bragou.

« Va breur Youen », eme Lan hag Herve, « ne oa ket diaes *da* (perak an *da-ze* aze ?) lakaat droug da vont en e ler, ne oa nemet *stlepel outañ* :

« *Youen ar poutouenn* (pod-houarn)  
*Kouezet e reor er soubenn.* »

Karet em bije gouzout gant piou eo bet Lan hag Herve o teski ar brezoneg. N'eo ket, avat, evit kas va gourc'hemennou d'o mestr-skol... An teotadou, e Breiz, a vez stlapet *d'unan-bennak*, ne vezont ket stlapet *outañ*, avat.

Met distroomp war hor c'haoz.

N'eus ket pell-bras c'hoaz em eus klevet eur verc'hig o lavarout d'he breur, en eur ober *bisk* d'ezañ :

*Michel*  
*Beg difisel* (difisil pe figus)  
*Ne gav ket mat ar soubenn vijel* (vijil).

D'am breur kosa, gwechall, e veze taolet war zigarez farsal :

*Yeun,*  
*Mestr ar greun,*  
*Mestr ar c'herc'h,*  
*Tout ar merc'hed yaouank war e lerc'h.*

Bep gwech e veze feuket Yeun o klevout traou ken divalo.

Evit lakaat droug da vont e korf va c'henderv Jañ-Pi, ne oa nemet lavarout d'ezañ :

*Jañ-Pier Bistrakik,*  
*Paotrig e vamm-goz,*  
*'N eur domma lost e roched*  
*'N doa poaet (poaet) bouton e gof.*

D'am breur Fañch e lavare holl dud an ti, en eur skrignal :

*Fañch,*  
*Eul logodenn 'n e vañch,*  
*Unan-all en e vrago,*  
*Biken ne zistago.*

Ne oa ket par d'an nebeut komzou-se da lakaat ar paotr da zirolla. Ne *denne* ket war hor bleo, evel ma lavar Lan hag Herve, rak ne veze fuzul ebet gantañ, met *sacha* a rae yac'h hag hep damant warno, ar pezh n'eo ket heñvel-tre.

Alia a ra Lan hag Herve o lennerien da zastum ar muia 'r gwella eus ar rimadellouigou-se. Daoust ma ne c'hell ket eur seurt tra ober muioc'h a vad d'ar brezoneg eget eur palastr war eur c'har-goat, ne gavan abeg ebet er soñj-se. Tud a-walc'h a zo hag a goll o amzer gant traouachou kalz disteroc'h.

Met ma vefen laosket da rei eun tammig kuzul da Lan hag Herve, e lavarfen d'ezo, krak ha berr, eo tremenet ar mare ma chome batet ar Vretoned d'ober estlammou ha da gana meuleudiou d'hor yez dirak ne vern pe seurt tamm koz-vrezoneg lakaet e skriturmoul a-wel d'o daoulagad, hag eo poent bras d'ar re a zo hor *gwella skrivagnerien*, war o meno, skriva gwelloc'hik yez o lennerien ma ne fell ket d'ezo lakaat ar re-mañ da drei kein d'ar brezoneg ha d'o c'hemerout evit farserien.

EGILE.

## II. — NIVERENN 21 SAV

Setu eul lizer all hon eus bet (dao ! war hor penn) : « ... Plijadur am eus bet o lenn niverenn diweza SAV. Diduellet oun bet gant pennad *Trezienn*, daoust pegen fall bennak eo skrivet. Ar paour kaez den-se ne oar ket ar brezoneg.

Studiadenn *Erwanig* diwarbenn ar c'hornandoned n'eo ket fall, met ezomm en deus ar skrivagner da glask unan-bennak da zifazia d'ezañ e skridou.

Paour kaez brezoneg ! Eun druez eo gwelout penaos e vez merzeriet gant e wella mignoned. »

Piou a lavaro d'imp e soñjou diwar-benn an niverenn 22 ?

## DIVINADELLOU KOZ

1. Eun dra a zoutenn mil bern plouz ha ne c'hell ket soutenn eur spilhenn.
2. Beva a ra e lec'h ma varfe ar yer ; n'en deus na pao nag askell hag ez a buan.
3. A-dreist va zi unan a daolan  
Da glask pa'z an, tri a gavan.
4. Daou gostez koad hag o c'hreiz kig.
5. Koad ar c'hreiz ha kig an daou du.
6. Me am eus eur wezenn a-dreñv va zi  
Ez eo gwelloc'h he c'hroc'hen egeti.
7. Petra a ya d'ar marc'had e bao en e ziadreñv ?
8. Petore differañs a zo etre eun alvokad hag eur yar ?

(Respontou en niverenn 22)

## RESPONTOU DA ZIVINADELLOU AN NIVERENN 21 :

1. Eur skedenn heol. — 2. Ar mor. — 3. Ar son.
- 4. Ar waz-dour hag ar prad. — 5. An tan. —
6. Eur plac'h a zoug eur podad laez war he fenn. —
7. Eul leue o tena d'e vamm. — 8. Al leue e kof e vamm. — 9. Eur wiz hag eun hoc'h (houc'h) (o daou e lavaront : oc'h, oc'h).

## An anoiou a ra Bretoned 'zo eus o gwragez

Eun Dardoup ne ra nemet « *Ma hãñi goz* » eus an hini a zo bet lakaet en e ser dre sakramant ar Briedelez. Kerkent ha ma vez bet eureujet e teu an ano-se er-maez eus e c'henou. Ne dle ket ar plac'hed nevez beza fougeet o klevout kement-se, rak peurvuia pa zimezont ne vezont ket holl diamzeriet. Dereout a-walc'h a rafe an ano-se ouz eur *c'haonec'henn* bennak, pe ouz « *unan hag a vefe aet an heol d'ezi dreist an treuzou* », evel ma 'm eus klevet envel ar merc'hed a zo deuet war an oad, pa n'int ket gouest da gaout bugale ken.

Sevenoc'h tud, war o meno, eo ar Rouziged pe Bidared. Didaot eo, koulskoude, o c'hlevout lavarout : « *Ma gwreg* ». « *Selaou 'ta, ar wreg* », eme ar Rouzig pa gomz ouz e vaouez. « *Ar wreg du-mañ* », emezañ c'hoaz pa vez o konta he c'haoz d'unan bennak.

Mar d'eo ret o barn hervez eun nebeut re goz anezo, ne glevet morse gwechall ar gouilhejen (juled Kerne) o lavarout : « *Ma gwreg* ». « *Ma maouez* » a zeue ganto, avad, leiz o genou. Toniuc'h ha dereatoc'h a oa an ano diweza-mañ, moarvad.

Kalz eus hor c'henvroiz desket (paotred Breuriez ar Brezoneg-Kador, dreist-holl) a lavar : « *Va fried* ». Ar re-all ne reont ket kement-se a c'heizou. Pinvidikoc'h ha farsusoc'h eo, alies, ar yez a gomzont bemdez. « *Gwamm, ma hanter-tiegez, mamm ma bugale,*

*ma c'hamalad-gwele* », setu an anoiou bourrus o deus kavet da rei d'o gwragez. Anavezet em eus eun trouc'her-baroiou hag a rae eus e hini : « *Ma zamm kroc'hen toull* ».

Yann Gêryänn, merour va mamm-gaer, ne da ket, kennebeut, da glask pemp troad d'ar maout. « Oc'h ober an diod » eo bet ivez epad ar brezel-mañ, emezañ. En D.C.A. e oa bet lakaet hag heñ a oa unan eus ar re a oa karget d'embreger ar « *rikou-selaouer* », evel ma lavar. Dre an ano-se e ro da c'houzout d'e genvroiz petra eo ar benveg a zo anvet « *détecteur de son* » gant ar C'hallaoued. Karout a ra Yann *plega e vrec'h* aliesoc'h eget e dro. Neuze e vez skañdalet yac'h gant e wreg. Setu perak, p'en defe karget muioc'hik eget e lod, e lavar d'e vignoned : « Alo, paotred, bremaik e klevo trouz ar paotr Yann adarre gant ar *c'haporal faoutet* ! »

PERIG AN NOZ.

## Diwarbenn « Eur brezegenn vrezonek gant Napoleon III

Er pennad-se (niverenn 21 SAV) em eus lavaret e voe eur pred bras e Cornuet, e ti ar briñsez Bacciochi. *Cornuet* a zo eun distresadenn c'hallek eus *Korn-er-C'hoed*, eun ano roet d'eur gêriadenn a zo tost da Golpeu, e Bro-Wened.

Eno edo kastell ar briñsez Napoleona-Eliza Bacciochi, eur giniterv d'an Impalaer Napoleon III. Daouzek vloaz a oa edo o chom e Breiz pa varvas en he c'hastell d'an 3 a viz c'houevrer 1869. Beziat e voe en iliz-parrez he devoa lakaet sevel e Kolpeu.

Hervez ar c'hazetennou a reas meneg eus beaj an Impalaer e Breiz, e tremenas hemañ dindan eur volzenor a oa skrivet warni : « *Duel mal her-koiner houet* ». Anat eo bremañ e tleer lenn ar c'homzou iskis-se evel-hen : « *Duet mat e Korn-er-hoed* ».

Y. ar G.

## ENVORENNOU A DURKIA

(kendalc'h)

Pa zegouezis e Turkia (e 1934) pell 'oa dija ma oa bet lakaet berz war dougen ar fez pe ar sarik (*turban*) ha ne weled mui nemet togou pe gasketennou war bennou ar wazed ; darn all eus ar re-mañ, tud yaouank dreist-holl, o vont diskabell evel m'eo deut ar c'hiz er c'hornog. Evit ar maouezed, ne gredas ket Mustapha Kemal (n'en doa ket kemeret c'hoaz an ano a Atatürk) difenn krenn outo da zougen ar ouel, hogen koulz ha dilezet e oa deut hemañ da veza d'ar mare ma veven du-hont. E-pad tri bloaz ne c'hoarvezas d'in keja gant eur vaouez vouchet nemet peder pe bemp gwech ha koulskoude e valeen awalc'h dre gêr, o vont da Virdi ar Reter-Koz e-kichen Santez-Sofia hag o tont endro, hag an dra-se bemdez e-doug meur a viz, keit ha m'edon oc'h eilskriva taolennou gennhenvelskrivet chomet diembann betek hen. N'eus ket, a gav d'in, da gaout keuz da wiskamantou ar seurt-se. Gouel ha dilhad a oa du-holl, o c'holei ar c'horf krec'h-traoñ, ledan endro d'ezañ, setu ma ne oa ket plijus-kenañ evit an daoulagad sellout ouz eun doare tasmant du hep dremm na dargreiz, na stumm na oad. Ar paotrezed a ya d'ar skol — skol etre dreist-holl — a zoug evel ar baotred kasketennou o skolaj. E Bulgaria ivez am eus gwelet an dra-se, o tenna, a gav d'in, d'ar c'hiz alaman. Tud ar werin a zalc'he awalc'h, ar re goz, da vihana, d'o gwiskamant broadel : ar merc'hed d'o dilhad du, ar

wazed d'o chupenn ha d'o çalvar (tchalvar) eun doare bragez damverr, ar strad anezi ledan hag o koueza betek etre an daoulin ; gant kasketennou avat e oa iskis ha digened ar gwiskamantou-gwaz-se. N'oa nemet ar c'hodjaed, hag, en eun doare hollek, an dud a iliz, an dud a iliz vuzulmat hag o doa an aotre da zerc'hel d'ar fez ha d'an turban. An dramañ avat ne badas ket, rak e 1935 — ma 'm eus koun mat — Atatürk a lakaas ober eul lezenn evit difenn d'an holl veleien dougen er-maez eus o ilizou gwiskamantou disheñvel diouz re an dud all. Eun tammig bihan a dabut a savas a-berz dileuridi ar relijionou kristen (Orthodoksed, Katoliked hag Armeniz), en aner ha nebeut goude arvestou souezus a c'helled gwelout : kalz a veleien c'hresian a zalc'he o bleo hag o baro hir, ken hir ha ma kreskent (Ermaez eus an iliz e raent eun tamm kempenn). Meurdezusoc'h ne oant ken a-se en o soutanennou ledan gant melginou ec'hon. Gant eun tog-meloñs pe vlot hag eur « Complet veston », kemm oa evelato. Ar re avat ha n'o doa ket o far e oa al leanezed likaet. Paourkaezed ! Sac'higellet en eun doare truezus, eun tog doun sanket war o fenn evel al laz-lutig war ar gantol, eur sae ledan hag hir meurbet o vont eus an diskouarn d'ar seuliou pe d'an douar. Paour kaez müezzined ivez ! Glac'haret e voen pa darze dirak va daoulagad eus balkon eur minare eun den hag a seblante beza eur simiad, gant e gasketenn labaskennet. Koulskoude, pegen plijus kevout galv eur müezzin, beure-mat pe diouz an noz, pa vez ken glan, ken doun ha ken marze'houlouet oabl Istanbul ! En arabeg gwechall, e turkeg bremañ e kaner meuleudi Allah (Tañgri e turkeg).

Kemmou all a zo bet c'hoaz gant bremanaat an Turkia. Pell ar aok ma teus er vro e oa aet kuit an holl enskrivadurioù e lizerennou arabek diwar ar

statioù hag all, ha ne weled mui nemet levrioù ha kelaouennou skrivet gant lizerennou latin. An dramañ a zo bet eun adreizadur eus an talvoudusa rak n'eo ket al lizerenneg arabat evit kenglota gant an holl soniadoù turkek. Ret e oa bet kemer lizerennou arabat adaozet diagent gant ar Bersed evit beza de-reatoc'h ouz o yez o-unan (ar Bersed a zalc'h c'hoaz d'al lizerenneg arabat) ha klask troioù da gaout lizerennou da gendereout ouz ar soniadoù diouz an turkeg e-unan. Kalz aesoc'h ober gant al lizerenneg latin hag en eun doare ijinek-tre eo bet graet gant houmañ evit dont da gaout en diwez eul lizerenneg nevez, eeun, sklaer, klok ha dereat.

Amañ e santan ar c'hoant da gomz eun tammig eus doare-skriva ar brezoneg. O ! glann eo va menoz ha pell diouzin-me ar c'heal da adenaoui amañ rendaelou skuizus ha difrouez diwar-benn ar gudenn heskinus-se. Ar brasa aotrounez war ar brezoneg a fell d'ezo — a felle d'ezo ar a-raok ar brezel da vihana — d'erc'hel an doare-skriva brezonek evel m'emañ. Bez' e c'heller kredi, e gwirionez, — pe e c'helled kredi araok an darvoudou-bremañ a lakajo Breiz da adkavout dizale he dieubidigez — ez eo furoc'h kenderc'hel da ober gant al lizerenneg implijet gant holl skrivagnerien a yez unvan. Ya, nemet — bremañ kalz muioc'h c'hoaz eget a-raok ar brezel — eur goulenn a chom da ober : « Betek peur » ? Eskemmet em eus liziri gant Roparz Hemon, bloavezioù 'zo, a-zivout an doare-skriva. E veno a oa : ret eo chom feal d'hon doare-skriva evit pell amzer c'hoaz, eur c'hantved marteze. Sellout a ranker ober koulskoude ouz daou dra :

1° hon doare-skriva ne vank d'ezañ nemet nebeut a dra evit beza peure'hraet.

2° e kelennadurez Stad dishual Breiz, daoust hag

e vefe hetus ober gant tuiou amzeriat ha gallus atao sellout ouz eun adreizadur ken pell ?

Evidoun-me a gav d'in e vefe ar gwella ober hep termal pelloc'h tri c'hemm : skriva *ü* e-lec'h *u*, *u* e-lec'h *ou* hag *ö* e-lec'h *eu*, hervez an eilskrivadur soniadurel, an hini eeuna, bet kemeret evel-just gant an Durked. N'eus ket eur skeud a abeg da zerc'hel d'an eilskrivadur gall : *u*, *ou*, *eu*. N'eo ket dre ma 'z int gall ; ma vefent bet talvoudus, dereat ouz hor yez, mat e vefe bet ober ganto. Met n'eus ket amañ a zigareziou ; eun abeg hepken a zo bet evit mirout *u*, *ou*, *eu* ha n'eo ket yezoniezel, pell a se : an aon da bellaat re diouz doare-skriva ar C'hallaoued, an aon da lakaat hini ar Vreiziz da veza re zisheñvel dioutañ. Gwir eo, ret e oa sellout ouz an tu-se pa ne zeske bugale Vreiz, e skoliou mistri o bro, nemet yez ha lizerenneg ar re-mañ. Ne c'helled ket sponta an dud gant ar pezh a zeue da veza diaesteriou evit speredou levezoniet gant doareou-skriva direizpoell koulskoude. Ma ne vefe kemm ebet o c'hoarvezout bremañ, n'eo ket ganin-me e vije bet skrivet al linenou-mañ diwar-benn ar reizskrivadur. D'ar maremañ avat, da vare hon dasorc'hidigez evel stad, daoust hag e chomimp trujad da levezon Vro-C'hall e-keñver an traou sota ? Daoust hag an Iwerzoniz o deus aon d'ober gant o lizerenneg enni lizerennou dianav e lec'h all ? Taerder hor breudeur tramor a c'hell beza eur skouer evidomp war an dachenn-mañ eus ar yezoniezel koulz ha war ar re-all.

\*  
\* \*

Adkemeromp bremañ hon danevellou turkek. Ne gomzin ket eus adreizadur ar gwir (lezennaoueg helvetic lakaet e-lec'h ar gwir muzulmat, eus likidigez ar Stad, eus treuzfurmader ar gelennadurez, h. a. E

nouspet levr ha pennad-skrid eo bet displeget hag addispleget kement-se. A-walc'h eo d'in eta ober amañ eveziadennou bihan a-zivout ar pezh em eus merzet amañ hag ahont dre gantren e straedou Istamboul.

Ne voen ket pell a-raok gwelout e teue alies ar ger « *Sümer* » war skritellou meur a di : « *Sümer Bank* », « *Sümer Sinema* », h. a, h. a. Edo neuze — hag e tle beza c'hoaz — faltazi an Durked troet war-du ar Sumeriz. Dedennet e voen gant ar stumm-spered-se peogwir ez oun sumeregour va-unan ha boulec'het e oa ganin-me eur studiaden vras diwar-benn ar verb sumerek, danvez eus ar re denna n'our ket deut a-benn c'hoaz d'e gas tre da vat goude hogos seiz vloaz a labour kalet. Gouzout a reer e vez graet Sumeriz eus tud an hen bobl a veve pell-bras 'zo (war-dro 3200-3300 ar. J.K. e teraou ar marevez istoriel) war-dro aberiou an Tigr hag an Eufrat a en em daole neuze pep hini diouz e du er pleg-mor persek. N'ouzer ket mat eus pelec'h e teuent ; ar menoiou a zo disheñvel e-touez ar ouizieien aze koulz hag e-keñver gouenn ar Sumeriz. Da genta e kave d'an hendraourien e oa ar Sumeriz berrbenneget evet an Asianed all (C'hourrited, Hittited, Mitanned, Elamiz h. a.) hogen ar c'havadennou diweza a laka da gredi e vefe kentoc'h an enep : ar Sumeriz a vefe tud hir-bennek. A-dra-sur ez int dre o neuz-den disheñvel krenn diouz o amezeien, Semited hag Asianed, ma varner anezo diouz an delwennou o deus lezet. O yez ivez a zo frouez eun ardivink-spered dibar, henstumm meurbet. Klasket eo bet meur ha meur a wech renka ar sumereg e-touez eur strollad-yezou bennak. Evit lod, ar sumereg a zo kar d'ar yezou oural-altaiek, evit lod all d'ar sino-tibeteg pe c'hoaz d'ar yezou dravidek, okeanek, kaokasiat, da zarn eus yezou Amerika, Afrika, d'ar c'hamito-semitik, d'an

indo-germanek... En eur ger n'eus ket er bed eur strollad yezou a zellid krenn ma ne vefe ket deut e penn eur c'helenner war ar yez-mañ-yez c'hoant d'e geverata gant ar sumereg. Eus ar strivadennou-se n'eo deut betek hen netra er-maez gouest da gendre-c'hi ar re all. Ha n'eo ket souezus pa soñjer n'eus war darn eus tenna skoulmadellou kinniget gant ar yez-mañ, ar verb dreist-holl, emgleo ebet etre ar sumeregourien en doare da rei eun diskoulm d'ezo. Hag an arnodou keñveria a zo bet graet hogos atao gant tud ha ne ouient nemet elfennou a sumereg. E-pad daou vloaz em eus graet va-unan imbourc'hiou kalet war an darempredou a c'helle beza etre ar sumereg ha penna strolladou-yez ar bed. Darvezadennou (1) nac'hus am eus tizet kalz muioc'h eget asantus (2) ha dilezet am eus enklaskou aner tra ma n'eo ket peuranavezet unan da vihana eus termeniou ar c'heñveriadur.

An Durked avat, n'eo ket e-giz-se e labouront. Divizet o deus eun devez, eur wech taolet kuit al levezon arabat ha tiltrou-noblañs an Islam, e oa ar Sumeriz o hendadou, gant kement a ziazez skiantel ha ma kaver en *Aeneis* pe er *Franciade*. En hevelep taol, eo deut ar sumereg da veza ar yez turkek koz. Eur wech divizet an dra, en deus klasket unan ben-nak e-mesk an Durked ar varreka he digablusa. Penaos avat, pa ne ouie hini ebet anezo an distera tamn sumereg, nemet dre furchal divurutell er geriaduriou sumerek ha turkek da glask geriou oc'h heñvalout kenglota. Seurt doareou, anat eo, ne dalv ket ar boan o barn. A-hend-all kredennourien (3) ar Stad nevez a embanne war eun dro diskennidigez

(1) résultats. — (2) positifs.

(3) doctrinaires.

an Durked eus an Hittited ha zoken eus an Elamiz. Hogen, daoust d'ar sorc'hennou-se, an Durked a zo anezo brogarourien feal ha taer ha pa gomzen gant lenneien Istanbul, ken unanet hag eeun en o feiz vroadel, ken diblegus war dachenn o zurkelez, gant c'houervoni eo e sonjen e chatalidigez ar Vreiziz, en o rendaeliou, e labour milliget ar gallekaat.

(da genderc'hel)

Remont JESTIN.

## D'unan dianket war an hent-bras

Pehini da genta 'n deus foeltret al liorz  
Savet ennañ ken koant bleuñv ruz hor c'harantez,  
Ha stanket ar stivell a rede dibaouez ?  
N'eus digarez ebet ; ha tec'h ! ne ran forz !

Aet da vugel e kelc'h da ziwrec'h re dener  
Oun dihunet e mesk va c'houk strobiniellus  
D'am ene c'hoaz eur wech ar bed a gan yac'hus  
Evel er fenneier youc'hadenn ar falc'her.

Dre vor ha dre venez lusket war bep gwerz  
E walc'hin dibreder en aveliou va nerz  
Ha kerzout a c'hellin, disaotret, brezelour.

Koulskoude, piou 'oar ? Pa vo strewet ha teuzet  
Ganin-me va lorc'h, er vuhez pa vin beuzet  
E talc'hin marteze skeud da vleo melen-aour.

P. M. MEVEL,  
*c'hovevrer 1939.*

## DISTRO

*D'am c'heneil mat M. Kenec'hdu.*

E prizon Sgan-Niederschlesien, Meurz 1941.

Pa vin distro d'am farrez eur Sulvez d'ar pardaez  
A-hed an hentou hir hag ar c'hamm-gwenodennou,  
Peurechuet ganin va lodenn a hirvoudou  
An hañv a'n devo glazet ar prajou war ar maez

Marteze tud ar vourc'h goapaüs a ziskouezo  
Va zamm dilhad' na rofent d'ar paour en aluzen ;  
Ne welin ket va c'halon skornet er binijenn,  
Va ene baour gwall nec'het o c'hortoz an distro.

Mont a rin heb eur sell d'ar vugale o youc'hal  
E disheol toenn an deilhou dindan gwasked ar gwez,  
An avel o voudal e mesk ar bleñchou kelvez  
A silo d'in em skouarn moueziou sioul gwechall :

« Setu dirazout kened da vro ;  
Ar plegou mor e faout ar stankenn ;  
An evlec'h a bign evel pedenn  
Da vamm evit ma teufes en-dro.

Digemer mat d'it krouadur kaez !  
Selaou kan laouen da yaouankiz  
Ma teuzo da boaniou 'vel ar gliz  
Pa lugern heol an amzer-nevez.

Kloc'h ar vered a lenv goustadik  
War da dud koz dindan an douar  
O stlejal warno nozvez klouar  
Ha peoc'h peurbadus maro ar c'hig.

Eun aezenn a luskel ar gwiniz  
Melen evel bleo flour da bried,  
Aezenn ken glan hag he bizied  
Pa evi warno dour an diskuiz.

Lez war da lerc'h lec'hid ha pec'hed  
Droukrañs ha reuz, preñved da vuhez  
Ha c'hoarz digabestr d'ar garantez !  
Emañ dirazout kened ar bed ! »

Ha me maget a geuz, simudet em izili  
Gant va c'horf saotret holl e pri pegus an estren,  
Pa vin beuzet e c'houez an elestr hag ar raden  
A glevo c'hoaz em c'hreiz gwrezenn va gwad o virvi.

Tro war dro d'in e sav evel moged miz here  
Skeud an amzeriou gweñvet re-abred aet e biou,  
Eñvor muzelloù ruz ha warno blaz avalou,  
Koef gwenn eur verc'h o vont d'an oferenn er beure.

Neuze bannou an heol dreist bevenn mor ha menez  
O sec'hi diouz va jod beradou dour an daelou  
Eus levez mab-den a skuilho d'in ar c'helou  
Pa vez distro d'e barrez eur Sulvez d'ar pardaez.

P. M. MEVEL.

## Sarmon evit gouel an Holl-Zent an deiz kenta a viz Du

Ar sarmon-mañ a zo bet embannet e 1893 en  
« Annales de Bretagne » gant F.M. an Uhel.

Kredi a ra an Uhel ez eo bet savet an dra farsus-  
mañ gant *Al Lae*, marvet senesal e Landerne er bloaz  
1791, hag e lavar :

« ... *Mont a ra en tu-hont d'ar wirionez, a-dra-  
sur, hogen nebeutoc'h koulskoude eget ma c'hellfed  
her c'hredi ; daou-ugent pe bemp bloaz ha daou-  
ugent 'zo, klevet em eus, war ar maez, sarmonou  
brezonek ken bourdus, pe dost, hag hemañ.* »

Graet hon eus eun tammig kempenn d'ar pennad  
e-keñver al lizerenneg bremañ.

Va farrezianiz kaez ! Ar bloaz tremenet, deiz evit  
deiz, am eus lavaret d'eoc'h kalz a draou mat da ober  
ha da virout en ho kalonou. Hogen hoc'h eus ankou-  
nac'haet anezo, pe ne fell ket d'eoc'h heulia va aliou.  
Hirio e lavarinn adarre va sarmon ar gouel diweza,  
gant traou nevez am eus laket ennañ, ar bloaz-mañ.

Dleout a reomp hirio pedi ar Sent a zo en neñv da  
dougenn dorn warnomp ha d'hor sikour evit pignat  
d'an neñv. Evit tapout ar seurt tra, n'eo ket a-walc'h  
flacha ar muzelloù en iliz ha kaout an nouenn araok  
ar maro ; ret eo en em diwall diouz ar pec'hed ha  
kinnig da Doue oberou mat, pe Sant Per, ar porzier,  
ne digoro ket d'eoc'h. Gouzout a rit ervat a zo bet

Sent e pep lec'h, e pep amzer hag e pep stad. Sant Vaze a zo eur skouer evidomp. Henez en deus gounezet ar baradoz, petra bennak ma oa maltouter en e yaouankiz. Eun deiz, e aour, en e zier a oe troet e deliou sec'h gant an Aotro Jezuz, a oa Doue. Neuze en em distroas hag e reas betek e varo eur binijenn vras meurbet ; hemañ a roas e danvez holl d'an iliz hag a deuas da veza klasker-boued. Er stad-se, Maze a debre ar boued roet d'ezañ, en tier, hag a vire gant evez an arc'hant roet d'ezañ evit digas d'eur beleg, da gaout oferennou. Pa oe deut da veza koz, ne c'helle mui bale dre ar vro, hag alies n'en doe evit magadurez nemet preñved ha yeoteier. Hogen ar vreinadurez o veza kemeret e dreidigou, ar sant a oe maget gant eur vor-vran, pehini a zigase d'ezañ eur pesk bemdeiz, hag eur biz da Vaze a c'hore bep kreisteiz. Ne varvas ket evel an dud all ; hemañ a bignas d'an neñv a-dreuz war e viz, a oa bet roet diou askell d'ezañ gant an Aotro Doue ; ar vor-vran a nije a-raok, gant eur goulou war he lost, evit sklerijenni an hent. Kement-se ne rafec'h ket, c'houi ! Ar garantez direiz evit an arc'hant, ar vezventi, al likaouerez a zo an abeg a goll hoc'h ineou.

E gwirionez ez it da glevout an oferenn bep sul ha bep gouel-berz ; mes ar baotred yaouank a sell ouz ar merc'hed hag an dud diskiant a gousk, evel ma ra ato Job Kerboriou, al leue. Pa zistroit, goude an oferenn, ho kalonou a frailhfe, ma ve ret d'eoc'h rei eul liard d'ar beorien a zo e-kichen dor an iliz ; c'houi a gav gwell palat eun toull en douar ha lakât ennañ ho pec'hejou, pe goulonderi ho yalc'h e ti an tavarner.

En aner e tastumit madou, mar ne rofec'h ket eul lod bennak da Doue, da lavarout eo d'an iliz ha d'ar veleien, laket gant an Aotro Doue evit prezeg an Aviel ha distrei an dud holl d'o deveriou. Evit eun

aluzen vihan, eur gwenneg roet d'an iliz, hoc'h eus en neñv eun tenzaour a gant gwenneg. Heuilhit ar skouer a Nonn Kerdroubar, a varvas bezan a zo triouec'h miz : pa rae e amann, an daouzekvet lodenn a gase d'ar presbital hag e c'houec'h buoc'h a oa ar brava eus ar barrez. Pa lac'hed eur penn-oc'h en e di, Nonna a roe d'am c'heginerez daou damm bras, unan lart hag unan treut, hep lavarout ar gwadegen-nou hag ar bouzellou. Bep gwech ma hale eur vuoc'h, Nonn a roe eur c'houlouenn da Sant Fiakr ha gouvezit o doa muioc'h a leueou eget ar re-all. Goude an eost, Nonn a gase eur sac'had ed hag eur sac'had gwiniz-du. Da Santez Nonn, e vaeronez, e kinnige kanab. A-raok mervel, en deus laket eun oferenn bep sizun evit e ine. Evel-se e heulias ato ar skouer a Santez Nonn, pehini a roe he dilhad d'ar beorien a gave war an hentjou. Eun deiz e c'hoarvezas ganti rei he holl wiskamanjou, nemet he hiviz, d'eur c'hlas-ker koz ha d'e c'hreg. Hogen, pa distroe d'he c'houent e tigouezas ganti, e kreiz an hent, an aotro Sant Houardon, harpet war e vaz, o klask bara gant e visac'h. Hemañ, enebour bras d'al luxur, kerkent ma welas eur plac'h koant, gant he hiviz hepken, a gredas e oa eur strodenn, eur c'hast o veza graet eun avoultriach. Neuze e kouezas warni gant e vaz, en hevelep giz ma vankas mervel Santez Nonn. Hogen ar Werc'hez ne fellas ket d'ezi koll eur seurt santez, skouer ar merc'hed war an douar. Dre eun huñvre, mamm an Aotro Jesus a disklerias d'al leanez eul louzou a oa tost da eur stivell. O veza laket bervi al louzou-ze, malet, al leanez a evas an dour hag a lakâs al louzou war he gouli, ha dioc'htu e oe pareet. N'eo ket evidoc'h e rafe ar Werc'hez eur seurt burzud !

Rankout a ra d'eoc'h lakât oferennou evit ho tadou koz, a zo er purgator ; neuze ho po oferenn

digant ho pugale, goude ho maro. Hirio an deiz, her gouezit ervat, an ineou o deus pec'het a zistro war an douar, en niver brasoc'h eget an deliou sec'h er c'hoajou. Mont a reont da welet o zi gwechall hag al lec'hioù o deus karet, e pelec'h o deus pec'het. Pa glevot ar Maro o skei war ho tor, da greiz noz, neuze e krenot abalamour na ouvezot ket evit piou e sko. Ar c'horf a deuio yen hag a vezo kaset d'ar vered en eun dumporell tennet gant eur marc'h n'en deus kig ebet war e eskern gwenn.

Pa distroot ivez war an douar, goude ho maro, da sellet ouz ho pugale, o devezo ankounac'haet ac'hanoc'h, evel a rit bremañ gant ho kerent.

D'an noz-mañ, na vougit ket ho tan, abalamour d'an ineou a gar dont da domma war an oaled, rak o bez a zo yen dindan an douar ; na lemit netra diwar ho taol goude ho koan, na boued nag evaj evit ma kavoc'h re varo da debri ha da eva, mar o deus naon ; roit kalz a aluzen d'ar beorien a deu da gana war dreuzou ho tor, rak an ineou a laka anezo da brezeg ; mar klevit eur vouez klemmus en ho ti, eun ine eo, o c'houlenn pedennou an iliz, ha na daleit ket da lakat eun oferenn evit tenna ho tad pe ho mamm diouz ar purgator.

Selaouit parrezianiz ; pell bras amzer a zo, e varvas er barrez-mañ eun toger anvet Kergarel ha lezanvet an Touzer abalamour d'e avaris. Koulskoude, a-raok mervel, e roas aluzennou d'an iliz ha d'ar beorien, e reas eur binijenn verr, e c'houlennas an nouenn hag e c'hourc'hemennas d'e vab lakat oferennou evit e ine. Hogen, abalamour ma en doa bet keuz da e aluzennou, Sant Per ne digoras ket d'ezañ dor ar Baradoz, ha Kergarel a yeas er Purgator. Evit an tad da veza avarisius, avarisiusoc'h c'hoaz e oa ar mab, pehini a vije marvet ma vije bet kollet d'ezañ eul liard. Goude maro e dad ne fellas

ket d'ezañ rei nag arc'hant d'ar c'halvez evit eun arched, nag eul linsel evit sebelia ar c'horf, hag e galon a oe rannet, en distro diouz ar vered, pa oe ret d'ezañ rei da breja d'e gerent a oa deut d'an interamant. Ne baeas ar soniou glaz nemet dre ar serjant, ha ne sentas ket ouz e dad en doa gourc'hemennet d'ezañ lakat oferennou evitañ. An tad paour a c'houzanvas poaniou kriz dre avaristed e vab. Da noz gouel an anaon, ine Kergarel a yeas en e di gwechall, e pelec'h ne gavas na tan en oaled, na boued war an daol. Neuze, evit dishunva e vab, e reas eun drouz vras gant eur morzol hag e c'hourc'hemennas d'ezañ a-nevez lakat oferennou evitañ. Hogen ar mab fall ne fellas ket d'ezañ adarre senti ouz e dad, ha d'an abardaez noz, an aotro Sant Loeiz, paeron e dad, a lakâs ar mab er purgator e-lec'h an tad, ha Kergarel a deuas adarre war an douar e doare e vab. Kergarel a baeas ar c'hloc'her hag ar c'halvez, hag an aotro person, evit arsao (*adsevel*) hep dale er Baradoz. Yann Kergarel yaouank a c'houzanvas poaniou kriz er purgator. Eun drouk-spered a dennas anezañ, e c'houg liammet gant eur chadenn houarn, hag e oe laket e-barz ar moged du. An tan, en ifern, a zo tommoc'h evit glaou beo, war an douar. An avarisius ne c'helle ket c'houezañ, o yudal hag o lammat evel eur c'hi kounnaret. E gorf a c'houeze ar gwad, ar mel en e eskern a verve, hag e chomas er poaniou kriz-se teir noz ha tri deiz, e-pad ma oa e dad en e lec'h war an douar. Pa digouezas er gêr, e vadou holl a roas d'an iliz hag e reas eur binijenn vras en eur glask e vara, betek ar maro.

Gouezit ervat va farrezianiz kaez, morse ne vez leusket den ebet gant Doue da vervel gant an naon, rak eun deiz ar C'hrist a vagas pemp mil den, hep niveri ar maouezed hag ar vugaligou, gant diou dlu-zenn ha pemp torz vara. Eur pec'hed bras eo labou-

rat d'ar sul hag ive d'ar goueliou, evel eo bet diskleriet d'imp gant an Aotro Jezuz. Hemañ, o veaji e Bro-Gerne, en eur brezeg an aviel, a digouezas eur sul en Huelgoat, hag o veza aet d'an iliz, evit pedi a-raok an oferenn, e welas tud eus a bep micher o werza, o prena hag ive oc'h eva en iliz, o c'hortoz an oferenn. Neuze Jezuz a skoas anezo gant e vaz hir ha teo, hag ar varc'hadourien a dec'has kuit, nemet ar c'hemenerien a es eas brouda anezañ gant o nadoz. Mes, dre eur burzud souezus, an nadoziou holl a en em yennas en o c'hig. Ar c'hemenerien a dec'has neuze, oc'h hirvoudi hag o lammat, ha kalz anezo a deuas da veza kakous. Abaoe an deiz-mañ, ar c'hemenerien a zo gwell ganto mont d'an davarn eget d'an iliz.

Ar vezventi a zo mamm da galz a bec'hejou. Ha re a arc'hant hoc'h eus-hu eta ? Goullonderit ho yalc'h oc'h ober aluzennou, rak pa 'z oc'h mezo, e rit avoultriaj hag e wallit ar merc'hed. En e yaouankiz, an aotro Priam a yeas d'an davarn goude an oferenn, ha pa oe mezo e lac'has e dad, e timezas d'e vamm hag en doe pevar mab ha teir verc'h, hag a-benn seiz vloaz, pe eun dra bennak goude, e c'hreg, pehini a oa e vamm, a varvas, hag en eun huñvre e dad a rebechas d'ezañ he maro hag a c'houlennas ma teuje da veza dall. Neuze en doe eur c'heuz bras hag e yeas diouz e vro gant e deir verc'h, e vibien o veza deut da veza kakouz. Priam a ouelas kement, ken a deuas da veza dall. Frealzet e oe eun nebeut gant e verc'hed, pere a rene anezañ. Hogen buanedigez Doue ne oa ket c'hoaz kouezet. E verc'hed a c'hoantaas eur paotr. An hini hena a lavaras d'he diou c'hoar : — « Hon madou holl a zo kollet, den ebet ne sell ouzimp ; evel-se klaskerezed omp o hentja eun dall. Mar kavit mat e prenimp gwin da rei nerz d'hon tad ha pa vezo mezo pep hini ac'hanomp d'he zro a gousko gantañ. » An ali a oe kavet mat gant an

diou all, hag ar verc'h hena a gouskas gant he zad an noz kenta, antronoz, an eil verc'h, ha goude, an deirvet. An teir flac'h a deuas da veza dougerezed. Bugel ar genta a oa tort, hini an eil kamm hag hini an deirvet bouzar. En eun hunvre, an tad a anavezas e bec'hed nevez. Neuze e kasas kuit e verc'hed miliget, hag e-unan neuze, hep eur c'hi zoken, e valeas dre ar vro betek an eur eus e varo. Dre ar skouer-mañ eo disket d'imp penaos ar pec'her a zo bepred kastizet.

E miz here e hader ed, hag er c'houraiz e reer pini-jenn. Hirie e pedimp an holl sent, warc'hoaz e pedimp evit an anaon. Pedit, azpedit Doue da gaout truez ouzoc'h.

Me am eus eñvor Annaig Gwisarn he deus kollet he ouenner. Ret eo d'an hini en deus he c'havet digas anezi d'ar vaouez paour-mañ, ha dleout a rit zoken klask anezi, ma n'eo ket bet kavet c'hoaz. Eun ober mat a vezo, en deiz ar varnedigez.

Gwiz Tangi Kerfaohir hag he c'houec'h hoc'hig a zo bet debret gant ar bleizi, er park tost da goad an dorgenn. Ret eo d'eoc'h mont gant ho chas ha fuzuilhou evit lac'ha ar bleizi-se, pe e kollot ho chatal holl, er goañv-mañ. Jakez Kergribet, perak ne gasez-te ket da vugel diweza d'ar c'hatekiz ? Te a laosk anezañ da luguda 'hed an deiz, war an hentou, da glask neizou ha da ober ar c'hanfard. Te a laosk ivez da verc'h hena da vont d'ar c'hoad gant ar baotred ; hen difennet am boa ouzit koulskoude ha bre-mañ ez eo dougerezed ! Penn avelet ! Den divez !

Va breudeur kaez, dalc'hit mat va c'homzou hag heuilhit va aliou : evit ober amann mat, ez eo ret pilat kreñv an dienn. Evel-se e ran ganeoc'h ; skei a ran warnoc'h evit ma viot gwelloc'h. C'houi a zo holl va bugale ; hervez Sant Yann, en aviel, ez oun ar paotr-saout, hag ez oc'h va chatal : marc'h, kazeg, ebeul, ebeulez, azen, azenez, azennig, ejen, buoc'h,

taro, leue, ounner, maout, danvadez, oan, bouc'h, gavr, bouc'hig, porc'hell, gwiz : ar manac'h eo ar c'hi.

Me a fell d'in c'hoaz komz d'eoc'h eus al likaou-  
riez. Mar ho pije eñvor eus ar pez am eus bet lavaret  
d'eoc'h er bloaz tremenet, c'houi a anavezfe penaos  
va c'homzou n'int ket sorc'hennou hag e redfec'h  
d'am selaou. Hon c'horfou a zo templou ar Spered-  
Santel hag arabat eo o saotra. Berzit (*gourc'hemen-  
nit*) mat ho merc'hed da vonet d'ar gêr. Alies e  
teuont da veza landourc'henn, evel ma 'z eo bet Mar-  
t'harid Hesked. Er goañv-mañ he deus chenchet he  
zrabidennou gant dilhad livastred ar c'heriou bras.  
Al libourc'henn-mañ a zo gwisket bremañ evel eun  
itron ; mes savit he lostenn hag e welot libistri ar  
pec'hed. Yann Hesked, koz touseg, kontamm an  
ifern, mar az pije trouc'het eur wialenn onn evit fro-  
ta kein ha kof da c'hoar, e vije c'hoaz amañ.

Tankerru ! ki kounnaret, lakât a rez butun malet  
ez fri moc'h, e-pad ma komzan ac'hanout ! Mar az  
tapan, torloskenn douar (*buzugenn*), e weli penaos  
ec'h hejan al laou. Ha lavarit-hu c'hoaz ez eo va  
c'homzou borod, pa 'z eo peurarruet va diouganou !  
Piou en deus disket d'eoc'h, Anna Kerbri, e oa dou-  
gerez an hini a zo bremañ greg Jakez Malard ? Ha  
n'eo ket me eo ? Ha mar n'am bije komzet gant  
Jakez, ne vije ket c'hoaz Anna dimezet. Tec'hit eus  
ar pec'hed ; diwallit ive eus ar c'hoant-lik ; heuilhit  
ar skouer dudius eus a Abraham, Isaac ha Jakob.  
Abraham a oa eur paotr brao. E-pad ma oa gant e  
dud, e c'hoarvezas eur vatez en o zi. Houmañ a oa  
anvet Agar (*a gar*), abalamour ma oa ato lupr, hag  
e pedas Abraham da bec'hi ganti ; mes an den san-  
tel a harluas ar plac'h, en eur rei d'ezi ugent taol-  
troad en he reor, ha mar ne vije deut eun ael a-berz  
Doue da digas boued da Agar ha d'he bugale, en  
desert, e vijent bet marvet gant an naon.

Selaouit bremañ ar burzud bras c'hoarvezet gant  
Isaac. Pell amzer a oa abaoe ma oa dimezet da Sarah  
ha n'o doa ket a vugale. Eun abardaez, setu ma ti-  
gouezas eun ael en o zi, e giz eur c'hlasker-bara.  
Isaac a bedas anezañ da goania gant e c'hreg hag  
heñ, ha goude ar pred, an ael a lavaras : « e gwirio-  
nez e lavaran d'eoc'h, a-raok ma vezo an dero glaz  
a-nevez, Sarah a c'hano eur mab ». Mes Isaac a  
c'hoarzas, o klevet kement-se, hag a lavaras : lu !  
Koulskoude Sarah a wilioudas, en amzer lavaret,  
hag hi meurbet koz. Ne vefe ket graet kement a  
bec'hejou bras, mar na antrefe ket asamblez ar baot-  
red hag ar merc'hed er c'hoajou hag er wenojennou  
goloet, o tistrei eus ar pardonioù.

Koulskoude Doue a denn ar vad diouz an droug.  
Setu-amañ eur skouer eus a gement-se : eun den en  
doa evit mevel eun aerouant roet gant Gwilhou goz  
(*an Diaoul*) e-unan. Ar paotr-mañ a sente e pep tra  
ouz e vestr, den dizimez ha gadal, hag a sikoure  
anezañ da walla merc'hed koanta ar vro. Mes o veza  
deut keuz ha mez d'ezañ eus ar vuhez-se, e tistroas  
hag e fellas d'ezañ kas kuit e vevel. Eun deiz, pa  
oant o vale, tost d'eur ster, ar mestr a lavaras d'e  
vevel : « Sell ouz an dour ! » ; hag e leuskas ker-  
kent eur bramm ha na oa ket dic'houez, ha na oa  
ket gantañ ive c'houez ar roz, hag e lavaras d'e  
baotr : « Red war e lerc'h buan ha digas d'in va  
bramm ! » Hag an aerouant a lammas er ster hag a  
voe beuzet.

A ! A ! A !... Setu aze eur sarmon ha n'eo ket evit  
ho lakât da lenva, a gredan !

Krenit ! Ar c'hontron a zo en ho korfou dic'hlan !  
Loui (*flaeria*) a rit flaer ar pec'hed ! Hastit ober  
pinienn hag e pignot d'an neñv war-eeun, ar pezh  
c'hoantaan d'eoc'h, en ano an Tad, ar Mab hag ar  
Spered-Glan. Amen.

## Kredennou ha brizkredennou e Breiz-Izel

(Kendale'h)

### DAÑSOU HA KANAOUENNOU AR GORRIGED

Plijadur vras o deus ar Gorrighed o tañsal en noz e skleur al loar, en-dro d'eun tantad bras. War al lannegou didud e vezont gwelet o korolli e-giz tud gouez en eur gana komzou kenta eur poz na echuont kammed o-unan. Iskis a-walc'h, a-hend-all, eo ar c'homzou-se peogwir n'ez eus anezò nemet niveradur deizioù kenta ar sizun :

*Disul*

*Dilun*

*Dimèurz ha dimerc'her*

*Diriaou ha digwener*

E-keit ha m'emaint o tañsal evel-hen, mar deus eun tremeniad daleet ar chañs-fall da dreuza al lanneg ma ebatont warni, e c'halvont anezañ dre e ano ; ma vez hemañ diboell a-walc'h evit respont, e vez stlejet e strobinnell o rondenn betek ma kouezo war an douar, tost da vervel gant ar skuizder.

Tri zu a zo koulskoude da vont e-biou d'ar hlannedenn griz-se. An hini kenta eo echui ar poz kanet gant ar gorrighed dre staga outañ unan pe diou werzenn ; e-keñver ar rim n'int ket figus. A-walc'h ez eus gant rimou dre vogalennou d'o lakaat laouen.

An eil eo, a-raok dont er rondenn, renka ar botou-

koad war an douar en eun doare seurt ma c'hellor, goude an dro genta, lakaat an daoudroad enno war eun dro. Ma ne zeufe ket an taol da vat ar wech kenta e c'heller esaea eur wech all.

An trede eo planta eur vaz en douar, el lec'h endeeun ma stager da zañsal, ha kregi enni en eur echui an dro genta.

Eveljust an hini hag a vez eur c'harzprenn gantañ n'en deus ket da gaout aon.

Damheñvel eo an holl gontadennou diwar-benn kejadennou beajourien ouz ar gorrighed.

### KORRIGED PLODREN

(adaozet diwar gontadenn Souvestre)

Bez' e oa e Plodren, e-kichen bourc'hig Lokeltas, eul lanneg anvet « Motenn-dervenn » ma teue bennnoz korriged da zañsal. An hini a veze tapet ganto a ranke chom er rondenn betek tarz an deiz ha ne grede ket an dud tremen dre eno. Eun abardaezvez edo Benead Gwilcher o vont d'ar gêr gant e wreg ; oc'h arat e oant bet 'pad an deiz. Ne oa ket diwezat c'hoaz ha setu i o kemer dre al lanneg, kredi ma raent n'o dije ket staget c'hoaz ar gorrighed gant o dañsou. Ne oant ket erru avat e-kreiz ar « Votenn-dervenn » ma weljont an dudigou en-dro d'ar mein bras, e-giz evned war eur park ed.

— « Santez Anna, eme Venead, graet eo ac'hannomp ! »

Evit gwir dont a rae ar gorrighed a bep tu war-dro Gwilcher hag e wreg e-giz kelien e miz eost war-dro eun dakenn mel. Pellaat a rejont avat pa weljont ar c'harzprenn e dourn Benead hag e krogjont da gana :

*Lez hi, lez han,  
Baz an arar a zo gantan ;  
Lez han, lez hi,  
Baz an arar a zo ganti.*

Neuze e komprenas Gwilcher talvoudegez e forc'hig e-keñver ar gorrighed ha tremen a reas a-dreuz d'al lanneg gant e hanter-tiegezh hep na vije bet graet an distera droug d'ezo.

Diwar neuze neb a yae er-maez diouz an noz a oa ar forc'hig gantañ.

Benead avat en doa c'hoant gouzout pelloc'h ; eur fuketer (1) a oa anezañ, lemm e spered ha ken lirzin ha n'eus forz pe dort eus eskoptiou Breiz ; rak tort e oa Benead, ganet-tort ha ne vije ket koustet ker d'an hini en dije prenet e goñvadenn digantañ.

Eun abardaevez 'ta e kemeras e forc'hig ha goude en em erbedi da Santez Anna e skoas war-du ar Votenn-dervenn.

A-boan m'e welas ar Gorrighed ma teujont davetañ o krial :

— « Benead Gwilcher eo ! »

— « Ya, va zudigou, me eo, eme an tort, dont a ran d'ober eur weladennig d'eoc'h. »

— « Demat d'it, a respontas ar gorrighed. Dañsal a ri ganimp ? »

— « Va digarezit, va zud vat, eme Venead ; nemet eun tammig re hir eo hoc'h alan evit eur paour-kaez tort evel-doun. »

— « Chom a raimp a-sav pa gari, » a lavaras ar gorrighed.

— « Prometi a rit ? » eme Venead en doa c'hoant d'ober eun taol esa da welout.

— « Prometi a reomp », a respontas ar gorrighed.

(1) *fouinard*.

— « War groaz ar Salver ? »

— « War groaz ar Salver. »

Setu an tort neuze o kemer e blas en o zouez ; hag ar re-all da staga gant o dañs-tro en eur gana evel boaz :

*Disul*

*Dilun ha dimeurz*

*Disul*

*Dilun ha dimeurz*

A-benn eur pennad e paouezas Gwilcher.

— « Resped d'eoc'h, va zudjentil, atao e teu an hevelep kanaouenn ganeoc'h ; n'it ket pell a-walc'h er sizun hag hep beza gwall ouiziezh war ar rima, kredi a ran e c'hellan hiraat an diskan. »

— « Deus 'ta ! » eme ar gorrighed.

Neuze e kanas an tort :

*Disul*

*Dilun*

*Dimeurz ha dimerc'her,*

*Diriaou ha digwener.*

Eur safar a savas e-touez ar gorrighed.

— « Start ! Start ! a hopjont o tont en-dro d'ezañ ; eur c'haner a spered out hag eur c'haer a zañser ; lavar c'hoaz, lavar c'hoaz ! »

Hag an tort da gana :

*Disul*

*Dilun*

*Dimeurz ha dimerc'her,*

*Diriaou ha digwener,*

tra ma trôenne ar gorrighed laouen evel an heol.

A-benn ar fin e paouezjont hag e c'houlennjont, holl a-gevret, outañ :

— « Petra a fell d'it kaout ? Petra a blijfe d'it ? Pinvidigez pe gened ? Lavar d'imp hag e roimp d'it pez az po goulennet. »

— « Ne farsit ket ? »

— « Ra vezimp kondaonet da zastum kement greunenn a c'heller kavout en eskopti, ma lavaromp gaou. »

— « Ma, eme Venead, peogwir e fell d'eoc'h rei eun dra-bennak d'in hag e c'hellan dibab, ne c'houlennan diganeoc'h nemet an dra-mañ : lemel diganin an dortenn-mañ a zo aze etre va diouскоаз ha lakaat ac'hanoun ken eeun ha fust banniel Lokeltas. »

— « Mat, mat, a respontas ar gorrigez, bez din ec'h ; deus amañ !... »

Hag o kregi e Gwilcher e tibradjont anezañ hag e stlapjont anezañ eus an eil d'egile, e-giz eur bolotenn c'hloan ken na voe echu gantañ tro ar c'helc'h. Neuze e adkouezas war e dreid, badaouet, hantervouget ; e dortenn avat a oa aet kuit ! Yaouankaet, brasaet, kaeraet e oa Benead !

Pebez souez pa zeuas endro da Lokeltas ! Den ebet ne oa evit kredi e oa Gwilcher ; e wreg hec'h-unan ne ouie ket re petra d'ober. Ret e voe d'ezañ lavarout pet a goefou he doa e-barz he fres ha pe liou a oa gant he loerou. Erfin pa voe asur pep hini, e voe goulennet digantañ penaos an diaoul e oa deut ar c'hemm-se warnañ. Benead avat ne felle ket d'ezañ hen lavarout gant an aon en doa da veza kemeret evel kompaer ar gorrigez ha respont a reas e oa bet didortet e-keit m'edo o kousket war al lanneg.

Diskredik e chomas darn koulskoude, en o mesk Per Balbouzig ; eur c'hemener e vleo ruz anezañ ha luch c'hoaz war ar marc'had. Ar Balbouzig-mañ ne c'hoarze kammed, ne gane ket ha ne zebre nemet bara-heiz ma veze gwelet plouzennou ennañ. Eun den piz e oa hag eun uzulier ; rivinet e oa bet meur a

hini gantañ. Gwilcher a zlee d'ezañ pemp skoed pell 'oa ha ne oa ket bet evit paea anezañ c'hoaz.

Mont a reas Per d'e gaout hag e c'houlennas digantañ e bemp skoed. En em zigarezi a reas an tort-kent ha prometi a reas e paefe goude ar foennadeg. Egile avat a respontas na c'hortozfe nemet eiz deiz c'hoaz met gant ma oufe penaos e oa bet yaouankaet ha didortet. Rankout a reas Gwilcher lavarout pez a oa c'hoarvezet.

Ober a reas dioustu Balbouzig e venoz mont da zañsal gant ar gorrigez, d'ezañ da c'hallout dibab ivez etre pinvidigez ha kened.

Ne oa ket savet al loar c'hoaz ma oa dija al luch war hent al lanneg, e forc'hig gantañ en e zourn. Ha setu ar gorrigez o tont d'ezañ ha Balbouzig en dañstro tra ma kane an dudigou du an diskan hiraet gant Gwilcher :

*Disul*

*Dilun*

*Dimeurz ha dimerc'her,*  
*Diriaou ha digwener.*

« Gortozit ! eme ar c'hemener, me ivez a fell d'in staga eun dra-bennak ouz ho kanaouenn. »

— « Stag ! Stag ! » a respontas ar gorrigez, hag i o kana adarre a-gevret :

*Disul*

*Dilun*

*Dimeurz ha dimerc'her,*  
*Diriaou ha digwener.*

Gortoz a rejont neuze ha Balbouzig a valbouzas e-unan :

*Gant... di...disadorn 'c'h echu...echuer*  
ar gorrigez a laoskas eur youc'hadeg.

— « Goude ? » a yudjont.

— « ...*di...disadorn 'c'h e...echuer.* », a adlavaras ar c'hemener.

— « Ha goude ?... goude ? »

— « ...*di...disadorn.* »

— « Goude ? goude ? goude ? »

— « *di...disadorn 'c'h ech...echuer !* »

Redek a reas ar gorrigez tu-mañ tu-se evel ma vije bet droug enno dre ma ne oant ket komprenet. Ar paour-kaez kemener a vanas spontet, digor e c'henou, hep ranna ger all ebet. Sioulaat a reas an dudigou a-benn eur pennad hag ec'h en em vodjont en-dro da Valbouzig en eur huchal :

— « Lavar da c'hoant ! lavar da c'hoant ! »

Hemañ a savas kalon ennañ adarre.

— « Va c'hoant, emezañ. Ma ! Dibabet en deus Gwilcher etre pinvidigez ha kened. »

— « Ya ; ar gened en deus dibabet Gwilcher ha lezet en deus ar binvidigez. »

— « Ac'hanta, kemer a ran-me pezh en deus lezet Gwilcher. »

— « Mat, mat ! a grias ar gorrigez ; deus amañ kemener ! »

Ha gwintet e voe er vann evel ma oa bet graet da Venead ha silapet a zourn da zourn betek penn ar chadenn ha pa en em gavas war e dreid adarre en doa etre e ziskoaz pezh a oa bet dilezet gant Gwilcher, da lavarout eo eun dortenn. Bremañ ne vije ket graet ken Balbouzig anezañ met Tort-Balbouzig.

Dont a reas war e giz d'ar gêr pinous evel eur c'hog dibluet. Pep hini a zeuas d'e welout war zigarez pe zigarez ha da c'hoarzin sioulik.

— « Talvezout a rin se da Wilcher, a soñje ar

c'hemener ; heñ eo, sur, en deus goulennet digant ar gorrigez ober an dro-fall-se d'in. »

Hag eiz deiz goude e teuas Balbouzig-an-Tort da gavout Benead hag o lavarout d'ezañ paea ar pemp skoed dioustu ; a-hend-all lakaet e vije gwerz war e beadra. Ha setu gwall-nec'het ar paour-kaez Gwilcher.

— « Da betra ' servij d'eoc'h beza didortet ha yaouankaet, eme e wreg ? Gwelloc'h e vije bet d'eoc'h goulenn arc'hant emichañs ; bremañ e ran-kot mont war an aluzen, genaoueg ! »

Digomz e chome Gwilcher nemet e soñje :

« Ya, m'am bije gouvezet, sur ! Ma ! deuomp eur wech c'hoaz da welout an dudigou. »

Degemeret mat e voe gant ar gorrigez ha lavaret e voe d'ezañ dont da zañsal evel ar wech kenta.

Daoust na oa ket e galon gant ar blijadur e krogas da zañsal forz hag ar gorrigez, dudiet, a rede, a lamme en eur gana :

*Disul*

*Dilun*

*Dimeurz ha dimerc'her*

*Diriaou ha digwener*

*Gant disadorn 'ch echuer*

A-benn eur pennad e lavaras Gwilcher :

— « 'M eus aon, aotrounez vihan, ez eo heñvel ho kanaouenn ouz ki ar c'higer : eur pao a vank d'ezi. »

— « Gwir an dra-se ! Gwir an dra-se ! »

— « Me 'gred e vefe plijusoc'h ma vefe lakaet eun troad all d'ezi. »

— « Lak' ! Lak' ! »

Hag an holl o kana c'hoaz gant eur vouez skiltrus :

*Disul  
Dilun  
Dimeurz ha dimerc'her  
Diriaou ha digwener  
Gant disadorn 'ch echuer...*

hag o tevel neuze da c'hortoz pezh a lavarfe Gwilcher.

« Nann ! emezañ, evelhen » :

*Disul  
Dilun  
Dimeurz ha dimerc'her,  
Diriaou ha digwener,  
Gant disadorn 'reer,  
Ar zûn da beurober.*

Eur youc'hadeg a savas a bep tu war al lanneg. En eun taol e voe leun a gorraged a zerede ; dont a rae darn diouz kuchennou geot, diouz bodou balan, diouz faotennou reier ; lavaret e vije bet eur ruskenn a dudigou du ; fringal a raent e-touez ar brug en eur youc'hal :

*Gwilcherig, o Gwilcher  
Te 'zo bet hor salber.*

« Petra ? Petra ? », eme Venead souezet.

— « Ya ! Barnet e oamp bet gant Doue da chom e-touez an dud ha da zañsal bemnoz war al lanneg, betek ma vije bet peurechuet hon diskan gant eur c'hristen ; hiraet e oa bet dija ganit ha kredi a raemp e vije bet peurechuet gant ar c'hemener. Manet eo sac'het d'an ampoent avat ha setu perak hon eus kastizet anezañ. Deut out a-benn, te, d'ober pezh n'en doa ket graet ; echu eo bremañ hor reuziad ha distrei a reomp d'hor rouantelez dindan an douar, ize-loc'h eget ar mor hag ar steriou. »

— « Peogwir emañ kont evel-se, eme Wilcher, n'it ket kuit hep diboania ac'hanoun. »

— « Petra ac'h eus ezomm ? »  
— « Peadra a-walc'h evit paea Balbouzig hizio hag ar fornier da viken. »

— « Kemer hor seier, kemer hor seier ! » a c'har-mas ar gorraged, hag i o skei d'ezañ ar seier bihan a zougent a-dreuz skoaz.

Dastum a reas kement ha ma c'hellas ha redek d'ar gêr lirin evel eul laouenanig.

— « Degasit ar goulou-rousin, emezañ d'e wreg ha prennit an nor ; setu-amañ peadra da brena teir farrez gant o barnerien hag o fersoned. »

Hag heñ da lakaat war an daol an holl seier bihan ha d'o digeri. Siouaz ! graet en doa priz an amann kent beza prenet ar vuoc'h ! Ne oa e-barz ar seier nemet traez, deliennou sec'h, reunennou hag eur re sizailhou...

— « Santez Anna, eme e wreg, graet o deus goap warnoc'h ! »

— « Siouaz ! gwelout a ran », a respontas Gwilcher.

— « Ha kredet hoc'h eus, inosant-kaez, saotra ho taouarn gant seier hag a oa d'an traouigou milliget-se ? »

— « E sell e oan da gavout eun dra bennak gwelloc'h e-barz. »

— « Ne c'hell dont talvoudegez ebet diouz pezh a zo didalvoud. Pezh a zegasit emañ a c'hell teurel barr ouz an ti ; Jesus ! daoust hag e chom c'hoaz dour benniget emañ ? »

Hag e redas betek ar gwele lec'h ma oa eur piñsin ouz ar voger, eur veuzenn emañ ; hogen a-vec'h ma oa bet touchet ar seier gant gliz an Aotrou Doue setu ma 'z eas ar reunennou e perlezennou, an deliennou sec'h e peziou aour hag an traez e diamantou !

Torret e oa ar strobinnell hag adkemeret o doa o neuz kenta ar pinvidigeziou kuzet ouz ar gristenien gant ar gorraged.

Benead Gwilcher a baeas e bemp skoed da Valbouzig ; kement paour eus ar barrez en doe eur boezellad winiz ha c'houec'h gwalenn lien ; arc'hant a roas ivez d'ar person evit lavarout hanter-kant oferenn. Goude se e prenas eun ti kaer hag e vugale a zo deut da veza hizio tudjantil.

#### AR GORRIGED HAG AR VUOC'H

Eun toullad korrighed o veza dañset a oa krog an naon enno hag e teujont e-barz tj eur paour-kaez deveziour ; hemañ n'en doa nemet eur vuoc'h. Hag ar gorrighed o c'houeza eur pikol tañ, laza ar vuoc'h hag he lakaat da rosta. Pa voe rostet bras e stagjont da zebri gant lontegez.

— « Roit d'in eun tammig da vihana », eme ar paour kaez den a wele e vuoc'h mont e stomok al lamponed, ha marteze ivez e oa hilliget e fronellou gant c'houez ar c'hig rostet.

— « Arsa, eme ar Gorrighed, c'hoant ac'h eus kemer perz er fest ? Dal, setu amañ da lod, ha ma vezez eur c'houviad a-zoare, e vo adroet d'it da vuoc'h ez-veo. »

Ne grede ket re an deveziour met evelato, peogwir e oa bet roet an aotre d'ezañ, e kargas e gof ar gwella ma c'hellas en eur soñjal :

« 'pez a vo tapet ganin a raio kement a vad d'in ha d'an hailloned-mañ ! »

An deiz war lerc'h, kerkent ha goulou deiz, e redas betek ar c'hraou ha laouen brao e voe o welout e vuoc'h. Ne badas ket pell avat ; beo mat e oa e vuoc'h nemet e vanke d'ezi an tamm en doa debret e-pad an noz.

Kement-mañ a oa kontet er C'hab-Sizun.

#### PENAOE E TIMEZE AR GORRIGED

Krizder ar gorrighed en doa lakaet an dud diwar ar maez da veza ken aonik, ma kemeras ar pleg ar baganed-mañ, divergont betek ar pal pella, da zont e-pad an oferenn en ilizou kristen ha da lida enno o eurejou hervez kustum o gouenn. Setu penaos e oa renket an traou :

D'ar mare ma rae ar beleg an embannou-dimezi, ar c'horrig a felle d'ezañ eureji, a gemere gantañ war e ziwrec'h e zanvez-pried, egiz eur bugel, hag a rae teir gwech tro an iliz en eur lavarout :

*Ganin 'mañ ma flandrigo*

*Piou na lavaro grik ?*

Chom a rae an dud sioul rak gouzout mat a raent e vije bet freuzet e zaoulagad d'an hini en dije digoret e c'henou, gant ar c'horrig nevez dimezet. Evelato, evel ma kreske bemdeiz niver ar gorrighed hag eveljust o laeronsiou hag o skraperezou, rivinet e oa Breiz en he fez ha glac'haret ar Vretoned. Setu ma 'z ejont neuze da gaout o eskob, o pedi anezañ d'o divec'hia diouz ar walenn-se ; ha dont a reas hemañ a-benn d'hen ober er c'hiz-mañ : e-pad an oferenn en doa taolet evez meur a hini ouz an dra-mañ ; pa veze lennet an aviel e kolle ar gorrighed eul lod bras eus o nerz, hag e henvelent gouziza, koueza, dre nerz eur galloud dreist d'ezo.

Lavaret e voe kement-se d'an eskob hag hemañ a c'hourc'hemennas da veleien an holl barreziou lenn an aviel eur wech c'hoaz, e dibenn an oferenn. Ne voe ket ar gorrighed evit derc'hel ouz an amprouenn-se. Mervel a reas eur bern anezo ; ar re all a zilezas ar vro hag abaoe n'int ket bet gwelet e Breiz.

Kemeret eo bet ar pleg diwar neuze da lenn an aviel e dibenn an oferenn. *(da genderc'hel)*

ERWANIG.

## FENTIGELLOU

### KLEVET E KER-VREIZ

*Yann.* — Va Doue, pegen piz eo da dad memestra !  
Kere eo, ha sell ouz ar botou a zo ganit !

*Lom.* — Ha da hini 'ta ! denter eo ha da vreur  
bihan n'en deus nemet eun dant.

---

— Ma kerez, tad koz, e lavarinn da vammig prena  
eur c'horn butun kaer d'it evit deiz kenta ar bloaz ?

— Bez' am eus unan dija, mabig.

— N'ac'h eus ket mui bremañ, emañ o paouez  
terri anezañ.

---

— Mamm, petra eo eun intañvez ?

— Eur vaouez n'he deus mui unan bennak er bed  
d'he frealzi ha d'he difenn.

— Neuze 'vat, pa vin bras, ne vi ken intañvez,  
mamm.

---

### KLEVET E SERWEL (BRO-DREGER)

Echu an oferenn veure. An Aotrou person o tont  
er-maez diouz ar sekreteri a ya d'ober eun tamm tro  
er vered en-dro d'an iliz. Bale a ra war e bouezig, e  
zaouarn a-dreñv e gein. A-greiz tout, en eur c'horn-  
tro eus ar vered, setu m'en em gav gant Fanchon

goz, en he c'hluch e-harz moger an iliz. Houmañ n'he  
deus ket klevet anezañ o tont.

— Hem ! Hem ! eme an aotrou person.

— O, ma Jesuz ! beza gwelet er stad-mañ gant  
an aotrou person, a c'hromell an hini goz en eur  
glask sevel.

— Chomit aze ! Chomit aze hardiz ! a lavar buan an  
aotrou person en eur vont pelloc'h, gwell eo ganin  
gwelout ar yar eget ar viou.

E. KENVEN.

## KELEIER

### SAV.

Strollad brezonegerien Pariz a oa morgousket abaoe ar brezel ; ne voe bodet an izili nemet teir pe beder gwech e doug ar bloavezh 1940-1941. Dihunet eo da vat adarre.

D'ar sul 30 a viz Du eo bet dilennet ar bureo nevez. Rener : Daniel ; eil-rener : Chalier. Dioustu eo bet boulc'het al labour. Gwilhou a ziduellas hor mignoned gant e enñvorennoù diwar-benn ar Boude-deo, evel m'en deus o c'hlevet digant e dad koz. Fromus evel kontadennoù an tasmantou, mes displeget en eun doare plijus betek lakaat pep hini da c'hoar-zin, betek rei d'an dud gwall-huñvreou.

Eil bodadeg : 21 a gerzu. Prezeger : Koulouarn. Dañvez : ar Brezoneg er radio. Arnodet eo bet rei menozioù nevez ha plijus, da dalvezout en abadennoù da zont evit plijadur an holl Vreiziz ha divizet eo bet dreistholl penaos ledanaat bepred tachenn ar brezoneg.

Teirvet bodadeg : 11 a c'henver 1942. Prezeger : Tillenon (*Al Louzaouer*). Dañvez : Ar strobiniellerez e Breiz. Eun dudi evit an holl klevout al Louzaouer displega e yez yac'h Bro-Leon eur bern mojennou dastumet gantañ en e vro, darn anezo dianav d'an holl.

Niverusoc'h-niverusa e teu ar vrezonegerien d'ar bodadegoù, ha dre-se e vez buhezek-tre an divizou. Er bloaz-mañ e vo eur vodadeg pep teir sizun d'an nebeuta.

### Parrez Brezoned Pariz.

D'ar sul 21 a viz Kerzu eo bet lavaret gant an abad Falc'hun oferenn genta ar barrez nevez digoret gantañ evit holl Vrezoned Pariz. Da 11 eur e voe kroget ganti dirak eun niver bras a genvroiz. Klevet e voe ar biniou, kantikou e brezoneg ha dreist-holl eur brezegenn gaer distaget fraez gant an abad Falc'hun e-unan.

Da zeiz Nedeleg e voe heñvel, hag hiviziken e vezo oferenn ar Vretoned bep sul da 11 eur e chapel Itron Varia ar Gonsolation, 4, Bali Edgard-Quinet. Evel e Breiz, roet e vez ar bara binniget ha lavaret pedennou e brezoneg.

### Ar Skol vrezonek e Kêr-Vreiz.

Peder skol a vez graet bremañ :

1. derez-izela : d'ar meurzh (19°15-20°15) ;
2. eil derez : d'ar merc'her (19°-20°) ;
3. derez an Trec'h kenta : d'ar yaou (19°15-20°15) ;
4. derez an Trec'h meur : d'ar sadorn (18°30-19°30).

### Skol Istor Breiz.

An Ao. Le Baner a ra skol war Istor Breiz bep merc'her.

### Skol war ar soniadouriez.

An Ao. abad Falc'hun en deus kroget d'ober eur rummad-kentelioù war ar soniadouriez (*phonétique*) ; kentel genta : 8 a viz genver. Bez' ez eus eur gentel bep yaou (8°1/2-9°1/2).

### Ganedigeziou.

Gwennola Koulouarn a ro da c'houzout eo deut d'ez, pemzek deiz goude ar Mabig Jezus (7 a viz gen-

ver 1942) eur breur bihan anvet Alan. Lanig hag e vamm a zo o daou yac'h-pesk. Laouen omp ivez, eun ezel ouspenn e SAV, gant ma vo distagellet mat evel e dad.

— Ganet eo d'an 28 a viz du eur verc'hig d'hor c'heneil Fusteg. Anvet eo bet Deneza.

Hor gourc'hemennou d'ar gerent hag hor gwella hetou d'ar Vretoned nevez.

#### Levr nevez.

Emeur o voula levr-deski brezonek an Ao. Daniel ennañ pemzek kentel ; implijet eo bet dija (skrivezet) e skol izel Kêr-Vreiz. Dont a raio er-maez e miz meurz.

#### Profou.

Setu amañ ar profou a zo bet roet d'imp e 1940-1941 : Di. Le Briz : 30 l. — A.A. Le Drezen : 10 l. — Bruchet : 50 l. — Debeauvais : 80 l. — G. ar Moal : 80 l. — Rimpot : 15 l. — Tregcoat : 10 l. — Even : 10 l. — Ezel : 5 l. — Quidna : 10 l. — Abad Clisson : 10 l. — Le Poncin : 5 l. — Quentel : 10 l. — Abad Saout : 5 l. — Urvoy : 5 l. — Abad Bourdelles : 10 l. — Leon : 10 l. — It. de Saint-Pierre : 80 l. — A.A. Vallée : 50 l. — G. Breton : 30 l. — Jezequel : 20 l. — M. Audic : 10 l. — Chalier : 80 l. — Toulmont : 10 l. — Di. Baron : 80 l. — Renault : 20 l. — Jade : 50 l. — It. de Saint-Pierre : 70 l. — J. Maze : 5 l. — Abad Saout : 5 l. — Di. Baron : 70 l. — Ao. Vallée : 70 l. — Mevel : 20 l. — M. Audic : 20 l. — Séité : 10 l. — Dorval : 30 l. — Chalier : 70 l.

Bennoz Doue d'an holl !

## LEVRAOUEG SAV

### 1. Niverennou koz SAV :

N <sup>os</sup> 1 ha 2	:	n'eus ken
» 3 betek 8	:	8 lur
» 9 betek 12	:	8 lur
» 13	:	2 skoed
» 14-15-16	:	8 lur
» 17-18-19-20	:	10 lur

2. « Ar Sorser », pezh-c'hoari fentus gant Job a Leon ha Laoudreger : 16 real.

3. *Nomenoe-oe*, gant J. Riou, skeudenent gant P. Peron (embannadur SAV) : 28 lur.

(10 % ouspenn evit ar mizou-kas)

## LENN ha STUDIA :

<i>La Langue bretonne en 40 leçons</i> (F. VALLÉE) . . . . .	18 lur
<i>Geriadur brezonek-gallek</i> (ERNAULT) . . . . .	18 lur
<i>Grand dictionnaire français-breton</i> (F. VALLÉE) . . . . .	75 lur
<i>Les mots français et bretons classés d'après le sens</i> (F. VALLÉE) . . . . .	10 lur (levr. I) 8 lur levr. II
<i>Notennou diwar-benn ar Gelted</i> pep levrenn . . . . .	3 lur hep geriadur 4 lur gant geriadur
<i>Sketla Segobrani</i> , pep levrenn	8 lur
E gwerz e Ti Moulerez Bro Leon, ru Lafayette, Landerne.	

TI-LOUZOU AR POST

# Marsel AODIG

(apotiker eus skol-veur Pariz)

4, Str. E. Cresson (18 Bali Orleans) PARIZ (XIV<sup>e</sup>)

LOUZEIER-MERK

LOUZEIER KEMENNET GANT AR MEDISIN

DROGEREZOU

C'HOUEZ VAT, SOAVON, HAG ALL...

*Kaset e vez ar varc'hadourez da di an dud*

Pell. SUFren 30-35

BREZONEG EN TI

ON PARLE FRANÇAIS

---

## BREZONEGERIEN !

*Prenit ho levriou brezonek e ti :*

**G. Verschuere**, « Levr di Breiz »

17 Kae Kastelbrient

ROAZON

**G. ar Moal**

8 Plasenn an Ti-eskemm

NAONED

**A. ar Floc'h**, « Levr di keltiek »

108 eil, Straed Roazon

PARIZ

# " S A V "

Kelc'h-gelaouenn drimiziek

(quaterly — Revue trimestrielle)

**koumanant bloaz : 30 lur**

Kas an arc'hant d'an Aotr. Daniel  
9 ter, rue de Rouvray, Neuilly (Seine)

C. C. 1902-50 Paris

Priz an niverenn : **10** lur